




Eun daolenn euz Bleun-Brug Lanniliz : ar Falherien.

PHOTO JOS LE DOARÉ

BLEUN-BRUG

Niv. 103-104 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

GWENGOLO-HERE 1957

TAOLIT EVEZ MAD

Kasit 500 lur (600 lur kourm. a enor — 1.000 lur kourm. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridou da : **Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).**

Mar fell deoh beza ezel euz ar **Bleun-Brug** pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.

C. C. P. 544.22 Nantes

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1.000 lur.

TAOLENN

Goude goueliou ar Bleun-Brug, gand L. B.....	1
Bleun-Brug Lanniliz, gand L. ar Menn	2
Goude Bleun-Brug Lanniliz, gand L. Lok.....	3
Bleun-Brug Lanniliz, gand Morvan	4
Prezegenn an Ao. Chaloni Falc'hun e Bleun-Brug Lanniliz.....	7
Kenstrivadeg ar prezegerezh Bleun-Brug Lanniliz	11
Kenstrivadeg ar skriva e Bleun-Brug Lanniliz.....	13
Kenstrivadegou ar Bleun-Brug	15
Traou gwelet er Portugal, gand J. Tricoire	17
Teñzor ar brezoneg beo, gand V. F.....	20
Keleier	23



133853

Goude goueliou ar Bleun-Brug

Tremen buan a ra deizioù brao an hañv ! Tremenet eo ive goueliou-meur ar Bleun-Brug ! Dre vadelez Doue, er bloaz-mañ, an amzer a zo bet a-du ganeom. Ar pezh e-neus sikouret kalz an traou da vond da vad.

A hazetennou, oll gwitibunan, o-deus grêt, d'ar mare, meuleudi ar goueliou a zo bet, dre bevar horn Breiz-Izel, e Leon, Kerne, Treger ha Gwened, eur mor a dud, eur mor a zudi evid ar spered, an 'daoulagad hag an diskouarn.

N'on bet nemed en unan, hini Lanniliz. E gavet em-eus treh d'an oll goueliou all am-eus bet tro da weled beteg-henn, dre an urz dispar, an echu a rene ennañ, ha muioh c'hoaz, dre an tommder a strinke endro dezañ.

Red eo beza gwelet al laouenidigez a bare war dal an engroez tud a oa diredet da bark ar Roual, ha santet pegen c'hweg e tride o halonou !

Evid eur bloaz all, eo klozet roll ar goueliou a oa evel an eost savet war labour stard ha kuzet or mignoned... Pebez konfort evito ! Med ar goueliou-ze, daoust pegen skeduz int bet, n'o-deus ket peurhrêt ar pezh a fell deom ober.

Ar gwir labour a gendalh : al labour da zihuna or henvroïz, da zeski dezo adkavoud ha prizoud kaerderiou ha teñzorioù o Breiz-Izel. Dao eo eta distrei d'an dachenn, evid difrôsta ha terri an douar, dao eo gwellaad c'hoaz ar binvioù-labour, dibab gwelloc'h an had.

Ha n'eo ket evel-se eo e ra, en amzer-vremañ, an dud diwar ar mêz en o atañchoù ?

« Diouz an dour eo mala. »

Goude beza bet mêz gand traou o'bro vihan, ar Vretoned, hirio, a zeu enna o-unan, hag a gomañs o haroud a-nevez ha beza fier anezo. Pell ema an avel oh esa trei ! Med trei a ra... Seul vui m'eo pouezuz al labour a venner ober, seul vrasoc'h ezomm a zo a imor hag a vouedenn-benn. Red eo derhel, kousto pe gousto, daoust ma 'z eo tenn hag hir ar hrogañ. Ar hoad kaleta eo an hini a zev ar goustata.

Ar gounid evid traou an ene, koulz hag evid traou ar spered, a houlenn, aliez, bloavezioù ha bloavezioù. Ar boan a gemerim ne zougo ket marteze an oll frouez a hortozom, med n'ez gao ket da goll.

Re all war ol lerh a eosto.

Tra-walh eo deom gouzoud emao war an hent mad, an hent bet digoret, en on raog, gand tadou ar vro, gand ar zent koz o-deus grêt he douar ha lusket he havell !

L. B.

Bleun-Brug Lanniliz

N'ema ket em zoñj rei deoh eun diverra euz Bleun-Brug Lanniliz. Ar journaliou o-deus komzet anezañ a-hed hag a-dreuz, hag oll int bet a-unan evid kaout brao ar gouel penn-da-benn ha rei meuleudi d'ar re oll o-doa e zavet. Ar pezh a hellfen lavared deoh eta war ar poent-se a ve gantañ dija c'hwez ar hoz.

Eun dra a zo evelato e-neus skoet ahanon ha meur a hini all. N'ez eus ket gand ar Bleun-Brug ar memez blaz ha gand ar gouelioù all savet ive kouls-koude en enor da Vreiz. O veza m'eo ar gouel-mañ tostoh d'ar bobl ha ma komz muioh d'e galon ha d'e feiz ar Bleun-Brug a zo deut da veza *pardon braz ar Vretoned*.

Levenez a oa, a dra-zur, e Lanniliz dre oll hag e kalon peb hini, eul levenez leun ha kalz a zispak gantañ. Hag an heol o lintra, ar hleier o seni, ar muzikou o sotal, an erminigou o sourral, ar bokedou brug o vransigellad, an drapoioù o fichal hag ar banielou o stlakal a oa eun testenñ frêz hag anad a gement-mañ. Evelato al levenez-se ne oe morse na diroll, na diskramailh o veza ma sante an oll n'eo ket ar Bleun-Brug eur gouel evel ar re all. Bez'ez eo eur pirhirinaj en amzer dremenet ha kement-se a ro dezañ ive, war-eun-dro gand eun nebeud douter, eur begad fristidigez. Ar barrad melkoni a gouez war galon peb Breizad pa zav war gorre skeudennou karet an amzer goz a viras ouz ar bobl da rei d'e levenez re a zispak ha re a err. E mare ebet euz ar gouel n'ez eus bet, a-berz dén, zokén a-berz ar yaouankizou an disterra dizurz pe an disterra cholori, zokén er Roual e-pad an abadenn c'hoari.

D'ar zadorn d'abardaez, an iliz a oa leun, ar bobl a oa sioul hag en-dra ma save e splannder ar sklêrijenn kanennou paotred ha merhed Landivizio, ene ar bobl dibradet diouz an douar, douget gand ar han, a gave anezañ e-unan an hent a gas da Zoue. Ar-sioulder-ze a dalveze eur bedenn, eur bedenn vud marteze, med eur bedenn euz ar re hweka.

Ar bedenn-ze, avad, a gavas he mouez hag eur vouez ledan, doun, uhel ha kreñv d'ar zul vintin, d'an overn-bred, pa dregernas an iliz gand ar Gloria, ar Gredo..., kanet war an ton braz gand eun ilizad tud, renet, eilet hag harpet en o han gand paotred ha merhed Plougerne ha Lokournan.

Seurt kanaouenn a-berz an oll a skoas a-dra-zur meur a hini ha n'oant ket boaz da glevet kement a dud oh embann o feiz gand kement a nerz hag a dan.

Diouz ar pardaez, en-dra ma teue ar brosesion war-zu an iliz-parrez, eur brosesion ha n'oa nemed ar hendalh euz ar pezh a oa bet gwelet a-raog, an hevelezh urz a renas a-hed an hent. A-veh tremenet dirazo bannielou ha kroazioù, an dud anezo o-unan a gemere o flas da heul hag ar han a zave nerzusoh nerzusa dra ma tostaed ouz ar vourh. War al leur-gêr eur bobl diniver a en em vodas evel-se e-pad m'en em vernie unan all e diabarz an iliz. Ar mare-ze euz ar gouel a daolas ar muia strafuilh er halonou. An oll a dride gand ar memez karantez-vro, gand ar memez feiz, ar memez fiziañs en amzer-da-zond Bennoz ar Zakramant a gouezas war eur bobl stouet d'an daoulin. Ha goude-ze, pa ziskennas, douget er vann da draon an iliz, oll drapoioù Breiz, en-dra ma kroze mouez an ograou, e santjed evel eur gridienn a lorr o tremen a renk da renk dre greiz an dud. Anezañ e-unan, evid an trede gwech e-pad ar gouel, ar hantik brudet «Da feiz on tadou koz» a zavas ledan ha nerzus hag ar han douget gand ar mikro a zavas hag a ruilhas war ar blasenn. En diabarz hag en diavéz ar bobl a youhe he feiz, heh esperañs hag he harantez.

L. AR MENN, *person Lanniliz*.

Goude Bleun-Brug Lanniliz

Ma vije bet lemm awalh va spered ha va fluenn o tond euz Bleun-Brug Lanniliz em bije savet kerkent eur ganaouenn war «eun ton anavezet» hini *Banielou Lambaol*:

Me 'm eus bet plijadur e Bleun-Brug Lannilis
O selaou pôtred Landi o kana en iliz.
O selaou ar bôtred ha merhed Plougerne
War leurenn ar patronaj da zul d'abardae.

Med, evid d'am hanaouenn kaoud eun doare poblel e rankfen sevel 99 koublad. Ha ne vije ket a re anezo evid rei da houzoud pegen plijet eo bet din Bleun-Brug Lanniliz.

Gand aon da gaoud rebechoù digand Lanis-Tivizio ha Plouiz-Kerne ne livirin ket eo bet hemañ bravoh eged o hini. Dreist int bet o zri.

Perag? Abalamour emaoñ e bro Leon; abalamour e kalonou Leoniz eo bet hadet, a bell zo, karantez bro war eun douar kristen.

Ha ma 'z eus bet tud brudet e Lanniliz o skriva e galleg evel Mathilde Delaporte ha Madame Penquer — muioh c'hoaz a skrivagnerien vrezoneg a zo bet, ha n'eo ket en aner eo. Daoust ha n'eo ket Yves Bergot, ganet (1761) ha bet person e barrez (1823-38) a skrivas *Bizitou d'ar Zakramant* gand skoazell e genvroad belêg J.-Mie Floc'h.

Piou, boazet eun tamm war istor ar brezoneg, n'anavez ket Guillaume Le Jeune (1735-1807) ganet e Lannilis, bet person Landéda ha Plougoulm, harluet epad ar Revolution, den desket awalh evid beza bet digemeret en Académie Celtique, sarmoner ha kantiker. Klaouestre, pa ganont *E tal ho Kroaz*, pe *Tavit, tud heb kreden*, nebeud a dud a oar ez eo ar hantikou-ze diwar dorn G. Le Jeune.

Ma karit c'hoarzin lennit skridoù Glaoda al Laë (1745-1791). Souezet on bet ne vefe ket bet a zoñj anezañ da zul da noz, ne vije ket bet inouet an dud o selaou *Sarmon var varo truezus Mikeal Marin*.

Ma klaskit eur skouer a vrezoneger, e kavoh war hoh hent an aotr. Morvan (1819-1897), brudeta medisin a zo bet e bro Leon. Hospital bras Brest a zoug e ano. War leurenn ar bolitikez e-neus bet beleien da adversourien, da enebourien ne lavaran ket. En em ganna a raent e brezoneg; o skridoù a zo mad da lenn.

Kaoud a ran war va roll tud brudet Lanniliz: Martin Mengant (1833-1899), maro person Telgruc. Savet e-neus ar hantig: *Klevit, o mamm a druez* — deut da veza, a gredan, ha n'ouzon ket perag, «Oll da Zoue» — hag an aotr. Pluchon bet savet gantañ, wardro 1840, sarmoniou brezoneg. Repuet oant e mirdi Saint-Loeiz Brest hag et e ludu diwar goust ar bombezadegoù.

Eul lanad-iliz all a zo da veza meneget: Al Louzaouer, Yves Tillenon, e ano (1883-1943). Hadet e-neus, gwerzennoù dreist-oll e nousped kazetenn. E anavezet am-oa e skolaj Lesneven.

Va zonz karantezuz, avad, edoug gouelioù ken kaer Lanniliz, a oa miret da vemor an aotr. Yann Roudot (1871-1925). E zaremredi em eus bet epad m'oa kure Lanniliz (1901-1914). Sonjal a raen pebeuz devez kaer eo bet evitañ er Baradoz or Bleun-Brug. *Le Petit Semeur* oa ano ar hannadig e-noa savet hag a vagas epad bloavezioù — eur gazetenn hag a dalv aour abalamour d'he danvez.

Karet em bije gweled c'hoari: *Maro Sant Tremeur — An Aotrou Tremenec'h* — pe *Saladin ar Foll*, pezian-c'hoari skrivet gantañ evid patronaj Lanniliz ha bet displeget er Bleun-Brugou hag n'ouzon ket e ped leh all.

An dorn e roe ive, diouz am eus klevet, d'ar gelaouenn *An Hader* — eur gelaouenn rouez tre — kannad ar Sillonisted diwar ar mezioù.

Setu eun hader da vihana ha n'eo ket bet kollet e boan oh hada. Ar re oll o deus, er bloaz-mañ laketa o foan da renka ken brao Bleun-Brug Lanniliz, a ho zet digollet dreist muzul o weled kement a dud deut da heuilh ar gouelioù hag o lenn er hazetennou a bep seurt meuleudioù. O gounezeñ o doa. Drevajou puilh a zavo deiz pe zeiz.

L. Lok.

Bleun-Brug Lanniliz

(13-14 a viz gouere)

Hervez komz an Ao. Chaloni Falc'hun, Aluzenner-meur ar Bleun-Brug, ar Gevredigez-mañ a zo deut da veza, gand he goueliou, eun tour-tan hag a daol e sklerijenn, heb bloaz hiviziken, war bevar horn al lodenn vrezoneg euz or Breiz. D'ar 14 a viz Gouere diweza oa tro Bro-Leon da veza sklerijennet, Bleun-Brug Lanniliz a zo bet eet mad endro, ha red eo kredi e-no taolet kalz had e sperejou hag e kalonou Leoniz.

Abadenn gan ar zadorn da noz.

D'ar zadorn da noz, derhent ar gouel, e oe klasket lakaad eur bobl a dud — leun-chouk an iliz ganto — da gemer blaz gand an toniou breizeg ha keltieg ha gand ar han liesmouezieg (à voix mixtes). Pell 'zo emañ ar Bleun-Brug o labourad war an dachenn-ze. Med d'ar mare-mañ on-eus an eurvad da gaoud d'on heñcha unan euz mistri-meur ar zonèrèz e Breiz hag e Bro-Hall : an Ao. Paol Ar Flem. Gand e harp e hello al lazou-kana e Breiz dond da veza niverusoh, hag er memez amzer par d'ar re wella er broiou all. Moueziou kaer a gaver e Breiz, emezañ, kement hag er broiou all, ha gand tud euz ar bobl e heller ober kanerien barreg awalh da vond en eul laz kana. Sklêr eo avad ez eo c'hoaz re rouez al lazou-kana hag e vo red labourad evid ma vo muioh a veleien, a leaned, a dud, c'hoanteg ha gouest da vale war roudou an Ao. R. Abjean, kure Landivizio ha rener « Kanerien Bro-Leon ». Kerse e kavan ivez e vije deut ken diêz sevel kanou nevez, breizeg an ton hag ar stumm anezo. Ar bed a zo eet ken garo hag ar vuhez ken chastreüz, ma vezer dieguz da zewel traou kaer. An Doktor Dujardin, rener Bleun-Brug Leon, e-neus ezomm da veza trugareket en abeg d'ar han nevez — ton ha komzou — e-neus savet evid Bleun-Brug Lanniliz « Kousk, va lellig ». E glevet on-neus diwar vuzellou Eliana Pronost, ha fiziafis an-eus e vo embannet dizale, evel ma tellez.

An dudi on-eus bet da glevet e Lanniliz : « Amañ pell diouz an trouz », « Kantik ar Baradoz », « A-hed an noz », « Ar barz yaouank », « Introun Santez Anna », « Ar Folgoad », « Kantik Sant Yann Vadezour », « An Anjeluz », « Pedennou diouz an noz », kemmesket gand pennadou-ograou breizeg euz ar re gaera, savet gand G. Pondaven ha klozet gand bennoz ar Zakramant.

Ar henstrivadegou.

D'ar zul vintin, nebeudig-tre warlerh an eur merket, eo leuniet iour-c'hoari Skol Sant Anton gand ar genstriverien hag ar henstriverezed a heb oad, en tu-all da 400 anezo. Unan eo euz lodennou pouezusa ar Gouel hag ano a zo anezi larkoh.

An Overenn-bred.

Da 11 eur, ne jom mui an disterra korn goullo en iliz parrez, pa giger gand an overenn-bred, kanet gand an Ao. Chaloni Fave, Vikel vraz. Iliz Lanniliz, bet kempennet ha renket diouz furnez ha barregez an Ao. Chaloni Le Menn, ar Person a-vremañ, a zo deut da veza deread-dreist ouz al Lidou sakr. en abeg dreistoll d'eun dispar a Aoter vraz, kensakret nevez 'zo. Kaerder al lidou, birvidigez ar han a zibrad an eneo a-uz da zisterachou ar bed.

D'an Aviel, an Ao. Chaloni Falc'hun, Kelenner meur war ar yezou keltieg e Skol-veur Roazon hag Aluzenner-meur ar Bleun-Brug, a ya er gador hag a zispleg peseurt kerentiez a zo bet hag a zo bremañ etre or yez hag ar Feiz katolig. Ar brezegenn-ze, disheñvel-kenañ diouz ar zarmoniou loazet, a zo bet kavet gand hiniennou pellig diouz ar relijion. Med tost eo chomet dezi, kalz

tostoh eged na vije soñjet. An neb a zo boazet da lenn prezegennoù PiXII n'e-no ket a boan ouz henn anaoud.

Menoziou ar prezeger a darz en eur yez sklêr-meurbed, nebeud a heriou diêz enni. Med ar menoziou a jom uhel, pouezet ha renket a-zoare. Red eo fizioud, avad, e-no gellet an disperedeka euz ar zelaouerien santoud e heller ober gand ar brezoneg koulz labour ha gand ar galleg, war-bouez... labourad, evel just !

Abadenn koroll, son ha kan.

Bleun-Brug Lanniliz a oa dleet dezañ beza Bleun-Brug an Aberiou. Dre e aberiou eo e tenne gwechall ar horn-douar mañ e alan. Dre vor eo et teue buhez dezañ. Ha dre vor eo ivez e teuas amañ on hendadou da groui eur bobl nevez. Lanniliz, end-eeun, a zo dalhet etre daou aber : an Aber-Ah hag an Aber-Benniget. War ribl hemañ eo e tremeno ar gouel-pobl savet gand ar Bleun-Brug. An Dimezell a Gerdrel he-deus bet ar vadelez da bresta dezañ an dachenn gaer a zo dirag Maner ar Roual. An dachenn-ze, peurholoet a dud beteg penn diweza ar gouel, a ziskouezo n'eo ket Leoniz dizeblantoh eged ar Vretoned all ouz hêrèz o zadou. Red eo fizioud o-deus Leoniz laketa kemm etre ar pezh o-deus gwelet ha klevet en devez-ze hag an traou divlaz a welont hag a glevont bemdez er radio, pe er sinema, pe en termaji. Sur awalh o-deus santet, en devez-se, o gwad a Vreiziz o tond da virvi en o gwazied.

C'hoariva braz an Aberiou.

Yann ar Bars, Kelenner e Skol an Aot e Gwiseni, e-noa savet evid Bleun-Brug Lanniliz eun Arvest taolennuz (jeu scénique), ennañ 16 taolenn ve : tennet euz istor ar Vretoned e Bro-Leon. An Arvest-ze a dlee beza eur gentel zispas war an amzer dremenet, en eur ziskouez d'an dud amzer goz or horn-bro a-raog ma touaras warnañ ar Vretoned ; donedigez ar Vretoned ; savidigez ar parrezioù hag ar houeñchou ; marevez skrijuz an Normaned ; amzer an Duked a oe taolennet gand iliz ar Folgoad, diazezet gand Yann V. Da-houde e tremenas dirazom ar skeudenn euz labour brudet an Ao. Mikael Nobletz ; ar frouez euz al labour-ze eo e-neus maget ene or broig ha kennerzet anezi er hantvejou tos'a deom. Hag en amzer vremañ, buhez Bro-Leon a zo diazezet war al labour-douar, ar besketêrèz, ar bezinêrèz, ar verdeadurez, ha dreist peb tra war ar Feiz katolig, oh en em ziskoueze er garantez e-keñver ar Werhez hag ar Zent hag e kement tra a zo bet savet en o enor. Setu aze ar gentel veur a roas d'an dud an Arvest taolennuz. Heuliet e oe gand ar vrasa evez, ha testeniu a zo deut deom da ziskouez eo eet doun ar gentel er sperejou hag he deus lakeet ar halonou da dridal. Bez' e heller fizioud e kavim, diwar an taol-mañ, muioh a Vretoned « dalh ha dever enno », evel ma lavare an Ao. Falc'hun d'an overenn-bred. Ar Bleun-Brug e-neus digoret aze eun ero nevez eleh ma savo eost mad.

Prosesion vraz parrezioù an Aberiou.

Heb an disterra skoilh, an arvest taolennuz a dro e prosesion, eur brosesion war gan, gand kroazioù ha bannieloù ar parrezioù tro-war-dro hed-a-hed daou gilometr. Pa loher, eo dispak an amzer, uhel ar mor, flour an avel. En eur gana gloar da Zoue, ar Vretoned, a-viliadou, a ya da gerhad bennoz an Ao. Krist !

C'hoariva-noz.

Rouesoh-kalz eo bet ar re o-deus gellet kemer perz en abadenn-c'hoariva er Patronaj. Warlene, e dibenn miz Mae, kêr Lanniliz he-doa bet dija eun abadenn-c'hoariva brezoneg penn-da-benn, dre aked an Ao. L. Fave, kure

greduz ha breizad evel ma 'z eus nebeud. Gand abadenn ar Bleuñ-Brug eo red kredi eo bet peurzanket an tach, hag o-deus an dud gwelet e heller kaoud plijadur gand ar c'hoariva brezoneg. Frealzuz oa evesaad ouz an niver braz a yaouankizou a oa er zal. Red eo lavared ive n'eo ket bemdez e vez kavet c'hoarierien evel Andre Pronost, diskibl d'an Ao. Perrot. Plijet gand Doue e hellfe an Ao. Noël, person Plonevez-Kintin, sevel deom peziou all, par da « Mil pok » da « Goell-bier » ha da « Mari beg an diaoul » !

Tachenn frank a oa bet fiziet e Laz-kana Plougerne, renet gand an Ao. Y. Plantec. Penn-da-benn ar Gouel, euz an overenn-bred beteg dibenn an abadenn-noz, al Laz-kana-ze n'ehanas nemeur da zistaga deom toniou kaerra or bro, ha red e vefe beza euz ar vicher evid soñjal klask eun dra bennag dibarfed en e zoare da gana. D'an oll e-neus roet dudi. Euz harr an neñv, an Ao. Perrot e-no gellet tridal ha frota e zaouarn o klevet kan bugale e barrezianiz koz !

Labour ar Bleuñ-Brug a ya beb bloaz war gresk ha war wellaad. Petra 'fell deom ouspenn ? Sklêr eo ne hell ket trei penn d'an traou en eun taol krenn ha lemel kuit an had fall e ree ano anezañ an Ao. Falc'hun. Re a dachennou disheñvel a zo, evid ma hellfe ar Bleuñ-Brug labourad warno oll war eun dro. Niveruz awalh eo dija ar re a zo bet fiziet ennañ gand e Ziazeour, an Ao. Yann-Vari Perrot, Doue ra bardono d'e anaon !

Bolontez vad eur vroad a-béz.

Mar deo deuet kenkoulz da vad, Bleun-Brug Lanniliz, eo dreist-oll en a-beg da volontez vad *Lanniliz*, da genta, ha d'an oll barrezioù diwar-dro.

Lanniliz da genta. Daou zen a zo bet ene ar Bleun-Brug e Lanniliz : an Ao. Pochat, rener ar homitê lokal, hag an Ao. Fave, kure ar barrez. Ra vezint amañ trugarekaet a greiz kalon.

Bolontez vad ive ar parrezioù diwar-dro, ha *Plougerne* dreist ar re all dindan renadur madelezuz an Ao. *Plantec*.

Setu amañ ar parrezioù o-deus c'hoariet ken brao er « jeu scénique » : *Lanniliz* ha *Plougerne*, evel-just, méd ive *Landeda*, *Treglonou*, *Plouvien*, *Lilia*, ar *Grouanec*, *Kerniliz*, *Guisseny* ha *Kerlouan*. Mil bennoz Doue dezo.

An abadenn « *Son, koroll ha kan* » a zo bet roet gand *kelhioù* Loperhet, Kleder, Leuhan, Douarnenez, Bourbriac, Montroulez, Plougastel-Daoulas, Ples-tin, Plouedern, Langonnet (Abati) ; gand *Bagadou* Koat-Serho, Bourbriac, Ar Flamm (Brest) ; gand *Lazou-kana* Plougerne ha Lokournan hag gand an Itron *Cueff* hag he bugale hag Eliana *Pronost*.

Morvan.



prezegenn an aotrou chaloni falc'hun e BLEUN-BRUG lanniliz

Va breudeur ha va hoarezed kristen, va henvroiz ker,

Pa deu tud diavêz da dremen an hañv war or mêzioù, war on aochou, e weler anezo aliez souezet gand eun dra nevez evito : an touriou tan o lugerni e kreiz an noz, hag o skuba, an eil goude egile, ar mor gand o sklerijenn, evid heñcha al listri da dehed diwar ar reier.

Gouel ar Bleun-Brug a zo ive eun doare tour tan, a vez enaouet beb an amzer amañ hag ahout war aochou Breiz-Izel, pe war an douar braz, da ziskouez d'ar Vretoned penaoz kerzed war roudou o zadou koz en eur ziwall war eun dro glanded o feiz, ha kaerder Breiz o bro. Ar re o deus gwelet gouelioù dudiuz Kastell-Paol, Lokornan-Kerne, Plougerne, Kastellin pe Landivizio er bloavezioù tremenet ne ankounac'haint biken an overenn hanter noz dirag ar mor, pe war ar menez pe war ar ster, pe dirag eur maner koz... hag eur mor a dud o pedi hag o kana birvidig, epad ma skede ar vein koz kizellet kaerroh eged dindan bannou an heol.

Ya, gouelioù ar Bleun-Brug a zo deuet da veza eul lodenn n'eo ket hebken euz kaerder Breiz-Izel, med euz kalon hag ene Breiz-Izel.

Enor eta, hag anaoudegez vad peurbaduz, d'ar beleg a feiz kreñv a oa en e galon tan awalh da enaoui evidom ar sklerijenn nevez-se ha d'he delher beo epad 40 vloaz, an Aotrou Perrot, bet keid all kure e parrez Plougerne amañ e kichen, hag e-neus prezeget meur a dro, sur on, euz ar gador-mañ. Enor ive d'ar re o deus, goude ar brezel diweza, kendalhet e labour gand kement a nerz kalon, dreist-oll an Ao. chaloni Fave, hirio viket vraz, hag ar Frer Seité. Ha bennoz deoh-c'hwil, parresioniz Lanniliz, trugarez d'an Ao. person, trugarez d'an Ao. mêr, evid an digemer mad a rit hirio d'ar Bleun-Brug.



Evid kompren petra eo ar Bleun-Brug, eo red deom ober eun dizro war an amzer dremenet, e penn kenta ar hanter-mañ. D'ar mare-ze edo en e wasa er Frañs ar brezel a eneb d'an Iliz ha d'ar feiz. Hag ar Vretoned, katoliked vad an niver brasa anezo d'an ampoent, n'oant ket gwelet dreist, p'o doa, ouspenn, gizioù, gwiskamanchou, kanaouennou ken disheñvel diouz re ar Hallaoued, pa gomzent eur brezoneg ken disheñvel diouz ar galleg. Setu perag ober brezel d'ar brezoneg, ober brezel d'ar gizioù breizeg, harpou ar feiz er vro, a oa eun doare da zinerza ar feiz he-unan, da hedall gelloud he has da netra. Araog ma oe tennet o 'fae digand an oll veleien, e oe tennet da genta digand lod euz ar re a brezege e brezoneg, a ree katekiz e brezoneg. Eur hiz koz oa, e gwirionez, abaoe an Dispah, ar Revolution, ober brezel d'ar feiz en eur en em gemer ouz ar brezoneg.

Evel just, divennerien ar feiz a zonjas ne rafent o dever penn da benn ma ne zivennfent ket er memez amzer ar brezoneg hag ar gizioù breizeg, p'o doa ar memez enebourien ; ar brezoneg hag ar feiz, emezo, a zo breur ha c'hoar e Breiz. Gand an amzer, ar gerentiaj-se a zo deuet da laoskaad eun tammig. Koulskoude, kerentiaj tost a zo atao.

Unan euz ar stourmerien wella etouez ar veleien yaouank a oe an Ao. Perrot, kure e Sant-Nouga beteg ar brezel pevarzeg. E Kastell-Keryann, evid delher beo etouez ar yaouankizou ar garantez evid Breiz koulz hag evid ar feiz, eo e savas da genta ar gouelioù brudet hirio dre bevar horn ar vro. Harpet e oe gand Albert de Mun, député ar Finistère, den helavar evel ne oa ket bet gwelet pell a oa e kambr an Deputeed.

Istor an hanter kant vloaz tremenet abaoe, ne gontin ket anezi deoh : He anaoud a rit koulz ha me : diou vrezel hir hag o deus falhet ar re wella euz

on tud yaouank, mahagnet kalz re all, hag a zo deuet, an diweza anezo, da leda
re dismantrou beteg goueled Breiz-Izel. Darvoudou hag o deus cheñchet kalz
traou e Breiz e keñver ar feiz, ar gizioù, ar yez, ha zoken an darempredou etre
ar brezoneg hag ar feiz.

Tennom da vihana euz an darvoudou-ze eur gentel bennag evid sklerijenna
an amzer da zond, ha gweled da betra e hell servichoud hoaz al labour kaloneg
boulhet gwechall gand diazezer ar Bleun-Brug.



Kentel vraz ar brezelioù eo an dismantrou spontuz a ziwan atao a zilerh
dizemgleo, dispriz ha kasoni, pe e ve er memez bro evel m'on eus gwelet er
Spagn n'eus ket pell, pe etre broioù evel ar Frañs hag an Almagn, teir gwech
e 80 vloaz. Ha warlerh an dismantrou e teu ar baourentez hag an dienez evid
poblou a-bez, epad bloavezioù ha rummadou.

Poblou braz an Europ a oa, daou ugent vloaz a zo, ar vistri war ar bed a bez.
Med o klask gouzoud pe hini anezo a vije ar henta, ar hreñva, o deus en em
zinerzet, hag en em rivinet an eil egile, rivinet an Europ a-bez. Ha setu bremañ
ar poblou melen, ar poblou du, gwechall leun a zoujañs evid an Europeaned,
oh en em zével a eneb dezo, o pedi anezo da vond d'ar gêr, o teuler anezo er
mêz.

Na disheñvel e vije bet an traou ma vije bet kristen e gwirionez gouarna-
mañchou poblou braz an Europ. Skigna o galloud dre ar bed o dije gellet er
memez tra, med o soñjal da genta e mad ar poblou all gounezet ganto, o soñjal
e oant dezo breudeur hena karget gand Doue da zigas dezo an Aviel hag an
deskadurez, ha d'o ren epad pennad war hent ar peoh hag an eürusted.
Evelse o dije gounezet da viken o anaoudegez vad hag o harantez, ha kendalhet
da veva ganto e peoh hag e mignonij.

Hogen, ma 'z eus bet greet kalz vad d'ar poblou-ze, o tigeri skolioù, ospi-
taliou, uzinoù, o teski dezo micherioù nevez ha doareoù êsoh da veva, n'o deus
ket santet awalh e veze greet kement-se dre garantez evito. Re aliez o deus
gellet kompren e klasked da genta pinvidikaad diwar o houst, dre o labour ha
diwar goust madou o bro. Evito o unan evel tud, ne zantent na karantez na
doujañs, nag evid o gizioù, nag evid o yez, o langach; dispriz kentoh. Ahano
gwarizi, kasoni, brezelioù da echui. Hag atao e kaver tud da c'hweza war an
tan eur wech ma vez bet enaouet.

Hogen, ma studiom piz ar gudenn, e welom frêz kement-mañ : an heñchou
fall bet heuliet er pez a anved ar holonioù, a zo bet heuliet en Europ da genta,
er Frañs koulz hag er broioù all, ablamour m'o deus or gouarnamañchou
dizoue ankounac'heet an doare kristen da zelled ouz ar bed hag ouz an dud,
ankounac'heet ez om breudeur d'ar memez tad, n'eus forz pegen disheñvel e
ve liotù ar horv, ar gizioù, ar langachou.

Ne vezo peoh nag eürusted ebéd war an douar keid ha ma pado ar broioù
braz ha gallouduz da ober o relijion hag o Doue euz klask beza, peb hini anezo,
ar brasa hag ar galloudusa er bed, da glask lakaad o hirri nij, pe o doare beva,
pe o doare kaozeal, o yez, da ren war ar bed a-bez.

Warlerh ar brezel diweza, ar Frañs, koulz ha meur a vro all en Europ, he
deus komprenet, evid mad en dro-mañ, ar gentel roet dezi : ne hell mui fizioù
beza biken ar vro galloudusa er bed, hag ar galleg n'e-neus ken an disterra
chañs da veza ar yez ar muia komzet dre ar bed, pell ahano.

Pegen cheñchet eo an traou e keñver ar poent-se abaoe ar Revolution ha
Napoleon kenta. Ar Frañs a oa neuze ar vro genta en Europ, gouest da zelher
penn d'an oll vroioù all bodet a eneb dezi. Ar galleg oa yez an dud desket, an
noblañs, hag ar rouaned, n'eo ket hebken er Frañs, med en Europ a-bez. Ma 'z
eus bet klasket neuze mouda e peb giz ar yezioù bihan er Frañs, n'eo ket heb-
ken ar brezoneg, med ive yez an Alzasianned, ar Brovañsaled, ar Vasked, eo dre
an abeg ma kreded ez edo ar galleg o vond da veza yez vraz ar bed a-bez, hag
e ranke da genta an oll Frañsizien rei ar skouer, ha dilezel o yezioù all evid ar

galleg, evid ma heñfent dedenna ar poblou estren war hent ar gallekaad. Setu
perag al labour kenta bet merket d'ar skolioù bihan er mare-ze oa skigna
implij ar galleg el leh ne veze ket komzet, ha d'e heul menoziou ar Revolution.

Ar galleg, va breudeur ker, a zo eur yez kaer ha pinvidig, a gaver skrivet
enni, a bell-zo, magadur a beb seurt evid ar spered hag an ene. Eun dra vad
oa eta skigna anaoudegez ar galleg dre ar skol, evid ma hellfe erfin an oll Frañ-
sizien en em gompren kenetrezo, mond euz an eil leh d'égile, ha gounid êsoh
o buhez ma karfent.

Eun dra fall oa avad, war zigarez skigna implij ar galleg, ober brezel d'ar
yezioù oll, d'ar brezoneg pe d'ar provañsaled. E Breiz hag er Provañs, ar bre-
zoneg hag ar provañsaled a oa er gêr a bell zo; hag evid ar galleg, eur wech
digemeret en ti, ha digemeret laouen, n'oa ket deread dezañ klask o zeuler er
mêz. Hogen, eul lodenn vad euz al labour merket dezañ gand ar houarnamant oa
o zeuler er mêz, pa vije bet ken êz d'ezañ beva e peoh hag e mignonij ganto.
Penaos?

Evel ma ra hirio diou, pe awechou teir yez, e meur a gorn bro euz ar bed.
D'ar vugale e vez desket da genta lenn, skriva ha konta e yez o havell, yez o
familh. Goude-ze, dre ar yez-se, e vez desket dezo eur yez all, an hini a rankint
da anaoud evid beachi, evid redeg da bell bro marteze warlerh a zamm bara.
An deskadurez a resevont eta eul lodenn e yez ar vro, hag eul lodenn all, al
lodenn vrasa peurliesha, er yez a zervicho dezo ar muia eur wech eet eun tam-
mig pell. Evelse e tapont buannoh ha gweloh deskadurez, ha n'en em gavont
na diêzet na diwarlerh pa guitaont o'horn bro.

Sur e hellom beza e vije bet en em skignet an deskadurez kalz buannoh e-
tousez ar bobl ma vije bet implijet an doare-ze e Breiz-Izel gwechall. Gweloh gal-
leg a vefe bet gouezet; gweloh brezoneg ive. Ne vije ket get gwelet ar re
yaouank o kaoud diegi, n'eo ket hebken o komz brezoneg, med oh anzae e oue-
zont brezoneg, e komzer brezoneg en o familh. Ne vije ket bet gwelet ar gerent
yaouank o teski galleg hebken d'o bugale, aliez galleg fall, diêz da zistroada
diwezatoh, war zigarez mired n'o dije o bugale kement a boan hag a zispli-
jadur hag i o-unan er skol gwechall, pa rankent deski lenn ha skriva eur galleg
ha ne gomprenent netra ennañ hoaz.

Setu penaos eo bed lakeet ar brezoneg er stad truezuz m'ema. Med setu
penaos ive ez eus bet greet euz ar vrezonagerien eur boblad tud hag en em
gemere o-unan evid Frañsizien a eil pe a drede renk, tud hag o doa mêz gand o
brezoneg ha gand o bro, da hedall kaoud mez gand o zadou koz hag o feiz, tud
heb divenn, prest atao da vond da heul.

Ar skol divrezonég, ma kendalh, a raio ahanom, a nebeudou, evel tud estren
en on bro on unan.

Hogen ar pez on eus ezomm evid sevel a nevez ar Frañs en he zav, hag evid
lakaad a nevez ar feiz kristen da vleunia enni, eo kalz tud hag a vo dever ha
divenn enno, tud ha ne houzanvint ket beza gwasket a eneb ar gwir war
dachenn ebéd, nag evel sitoyaned nag evel kristenien, tud a benn, tud d'en em
lakaad e penn evid kas an traou en dro.

Setu al labour ema ar Bleun-Brug oh ober hag o sikour ober, dindan pae-
roniez oll eskibien Breiz. E labour n'eo ket dreist-oll klask savetei traou ha
n'int nemed traou, gwiskamañchou, kanaouennou, pe ar brezoneg. E labour
kenta eo deski d'ar Vretoned petra int e gwirionez, deski dezo en em zelher,
ha kaoud doujañs evito o unan da genta, hag evid ar pez a zo a vad hag a gaer
en o bro, ma fell dezo beza doujet hag enoret gand ar re all.

Hogen, war ar poent-se, henn anzae a hellom gand eun tammig lorch, on eus
gounezet kalz tachenn dija abaoe 10 vloaz. Gwelit pegen kaer e vez hiviziken
or gouelioù breizeg, gand or yaouankizou gwisket dudiuz, hervez gizioù koz
ar vro, o vale en urz warlerh bombard ha biniou o seni sklintin, gand ar
hanaouennou dispar, gand dañsou ar vro, atao ken deread. Daoust ha toniou
or hanikou brezoneg n'int ket dreizo o unan eur bedenn euz ar re gaerra peo-
gwir en em zantom evel dibradet ganto warzu an Neñv?

E bro ebéd kennebeud, a greden, ne gaver kement a ilizou kaer kuzet war
ar mézioù, evel testeni euz feiz birvidig ar gristenien a zavas anezo. Hag hirio,

pebez soutezenn ha pebez dudi evidom-ni o bugale vihan, hag evid an estren a deu d'or gweladenni, gweled e kreiz an noz an touriou hag an ilizou o lugerni a bell, gwisket o mein dantelezet gand eur sklerijenn skeduz a hiz nevez. Eur gwir belerinaj a heller da ober hiviziken, en nozveziou hañv, o vond da weled ar Folgoad, Gwimilio, Sant-Tegonneg, Kastell-Paol, ha meur a leh ken kaer all. Bezom anaoudeg evid ar re o deus gouezet lakaad da dalvezoud evelse traou kaer or brô. Bezom anaoudeg dreist-oll evid on tadou koz o deus gouezet das-tum evidom eun heritach ken pinvidig.

Euz an heritach-se, eul lodenn a zo hoaz ha n'eo ket enoret evel ma tle beza, hag al lodenn-ze eo ar yez, ar brezoneg. Ne vezo ket peb tra en e blas e Breiz-Izel keid ha ma ne vezo ket roet eur plas, hag eur plas a enor, d'ar brezoneg en or skoliou. Demzigoret eo bet an nor dezañ abenn ar fin, rag n'ema mui ar gouarnamant a eneb d'ar brezoneg evel gwechall. Gouzoud a ra ez eo ar brezo-neg tra ar vrezonegerien da genta, hag ez eo dezo da genta lavared petra 'fell dezo ober gantañ. Hag or c'hoant, or bolontez stard eo e chomfe beo, hag e ve enoret e Breiz-Izel keñver ha keñver gand ar galleg. Deom eo lavared an dra-ze kreñv awalh evid beza klevet ha selaouet, evel ma 'z eo or gwir.

Achu eo an amzer ma chome ar vugale 2 pe 3 bloaz hebken er skol, just awalh da dapoud eun tammig galleg, ha da zeski lenn, skriva ha konta. Heb dale, evel e kalz broiou estren dija, e ranko peb bugel chom er skol epad 10 vloaz da vihana. Amzer da zeski kalz traou. Da zeski mad ar galleg. Da zeski brezoneg mad ive. Da zeski seul welloh ar galleg ma ouezint mad ar brezoneg. Rag evelse hebken e hellint miroud da veski an eil gand egile heb gouzoud dezo, ar pezh a c'hoarvez en deiz hirio gand kalz tud.

Evelse ive e pareo eur hleñved diplijuz kenañ evid ar Vretoned desket, hag evid kalz tud estren pa deuout er vro; gweled eur bobl hag e-neus evel méz gand yez e dud koz. Eur hleñved eo hag a zo bet digaset deom gand ar skol divrezonég, hag a rank mond kuit dre ar skol vrezonég.

Enerom eta or brezoneg. Prenit ar helaouennou brezoneg, al leoriou brezo-neg a vezo kinniget deoh er Bleun-Brug. Deskit or hanaouennou kaer, or han-tikou dudiu, ha karit kana anezo. Ha sellom gand fiziañs, gand levenez, warzu an amzer da zond. Teñval ha du eo, a lavaro lod. An amzer da zond a vo dreist-oll ar pezh a raim ni anezañ.

Hag evidom-ni kristenien, an amzer da zond a dosta ahanom eun tammig muioh bemdez euz levenez ar baradoz. Penaoz ne zellfem ket outañ gand kalon, fiziañs ha levenez? Diêsteriou a gavim war an hent. An diêsteriou trehet eo a raio or hurunenn. Ha peseurt blaz he dije ar vuhez anez ma rankom stourm heb ehan ouz diêsteriou a beb seurt? Daoust ha n'eo ket dre ar stourm eo e teu an den da anaoud ment e nerz, da veza treh dezañ e unap da genta, ha war ar bed pa hell, da veza den e gwirionez? Er stourm hag el labour eo ema ar brazder gwirion, hag al levenez. Dre-ze ive eo e hellom tañva beb an amzer ar blijadur da deuler eur zell war an dachenn gounezet, evid kaoud muioh a nerz kalon da gendelher.

Stourmom gand kalon, s'ourmom ive gand furnez. Sellom piz petra zo her-vez on galloud, ha petra n'eo ket; ha na dorrom ket on penn ouz ar pezh n'ema ket e galloud den. O! ma vije an dud en deiz hirio ken fur ha ma 'z int goui-zieg, pegem kaer e ve beva. Nag a boan, nag a arhant dispignet evid paea follen-tez brezelioù an amzer dremenet, pe da glask beza prest da zelher penn da follentez an amzer da zont.

Dispignom ni ive eun tammig euz or poan, eun tammig euz on arhant, evid delher Breiz kristen en he kaer, hag on dezo digand Doue, digand an Intron Varia, Santez Anna, hag oll Zent' Breiz, eun digemer laouen er Baradoz. Evelse bezet greet.

F. Falc'hun.



Annick CABON

Kenstrivadeg ar Prezegerez Bleun-Brug Lanniliz

14 GOUERE 1957



Muioh-mui ez a an dud diwar ar maez. Perak? Penaoz miret ouz an drouk-se d'en em astenn?...

Kenvroiz ker, lavaret e vez a bep tu n'ez eus ket kaeroh micher eged ar vicher-gouer. An dra-ze a glevom dreist oll war muzelloù an dud ha ne anavezont netra ebed diwarbenn an traou diwar ar maez.

Hogen etouez al labourerien douar e klevom muioh a glemmou ha ret eo beza dall evit chom heb gweled ez a bemdez muioh an dud, ar re yaouank dreist-oll, diwar ar maez.

Bez ez euz aze eur gudenn hag a rankom da zisklouna.

Ar vicher-gouer a zo kaled. E meur a leh al labour ne echu nemed gand an deiz, ha diaez eo niveri an nozveziou-gwenn a rank ar houer tremen en e greier wardro e jatal.

E peleh ez eus muioh a riskl eged war ar maez? Pa hader eur parkad gwiniz eo heb gouzoud pe briz e vezo peet, heb gouzoud pe e vezo founnuz an eost pe ne vezo ket. Rak Doue hag an amzer eo mestr braz ar houer.

Gouizieg e ranker beza evit kas da benn labourioù a hiz nevez pa ne vezer bet e neb leh ebed ouz o deski. Ar re yaouank, ha mad a reont, o deus c'hoant labourad hervez o amzer ha n'eo ket evel ma ree o zud koz en o raog. Med evid an dra-ze e ranker kaoud binviachou a beb seurt. Ha bihan eo gounidègèz al labourer evit prena ar pezh a vije ret dezañ da gas da vad e labourioù.

Evid bale gand an amzer e ranker kaoud binviachou. Met kenta benveg al labourer eo an douar. Hag er horn-bro-mañ da vihana eo an douar eo a vank deom. Pa vez braz ar 'familh, pa jom unan er gêr, ar re all a rank klask el leh all. Klask eun tiegèz goulllo. Pe mond da vab kaer. Met neuze e ranker kaout ivez eur plah yaouank stag he halon ouz an douar. Kalz traou a vez lavaret hirio diwarbenn plahed yaouank or maeziou. Deuet int emezaoun, da veza dimezellet ha ne fell ket dezo louza o daouarn oh ober wardro ar chatal hag al labour douar... Med ni, plahed yaouank, a vez laketa kalz a draou war or hont. Aez eo tamall an dud, diaesoh a hompren. Ne deufe e spered maouez ebed goulenn digant eur gwaz ober, ouspenn e labour douar, ar hauez, ar gegin, an diena, ar ribotèrèz, ar marhad... ha me oar me! Ha perag? Gouzoud a ra n'ema ket aze labour eur gwaz pa vez merhed d'henn ober... Ha goulskoude bez ez eus kalz gwazed hag a houlenn digand ar merhed hag ar plahed yaouank an oll labourioù-se ha traou all ouspenn.

Na lavaran ket ne dlefe morse ar merhed mond d'ar parkeier: bez ez eus mareoù hag e rank peb hini rei an dourn d'egile: pa vez doare 'fall d'an amzer, da vare ar fœn hag an eost, ha pa vez red rei eun taol dourn. Peb hini a oar peur e son kreisteiz en e di!

C'hoant lavared am eus n'eo ket istimet awalh labour an ti ha labour ar gêr... E pe leh ema ar gwaz ha ne grogfe ket gand muioh a galon en e labour ma kavfe atao ar pred dare ouz e hortoz, an ti renket ha kempennet mad, e wreg fichet kaer ha laouen ouz e zigemer. Med penaoz ober an dra-ze pa rankom kroumma or hein ha rida on tal gand ar skuister ? E peleh e rentfe muioh a zervich eged war ar maez kaoud dour en duellen, eur plas da walhi tost d'an ti, ha kement tra a hellfe aesât al labour o vale dre ar gaz pe an « elektrisite ». N'eus ket keid-se eur plah yaouank a lavare din : « Me a en em blije war ar maez, nemed e ranked mond d'ar park bemdez, hogen al labour-se a oa re bounner evidon... » Ped ha ped a hellfe lavared ar memez tra ?

Hunvreal, a dra-zur, a ra a dud yaouank a ya e kêr. Avi o deus ouz ar dervezioù labour berr, an eur da gregi ha da echui, ar pae sur beb miz, an ausransou, ar zul hag ar goueliou, teir zizun ehan beb ploaz.

An oll dud n'hellont ket, a dra-zur chom war ar maez. Med ma 'z a diwar ar maez kement hini a zo pinvidig a vadou pe pinvidig a spered n'hello ket ar vicher gouer mond war raog. Rag war ar maez, koulz, pe vuioh zoken eged el leh all, ez eus ezomm a dud gouizie.

Ar houarnamant a hellfe ober lezennoù evid or zikour eun tammig gwelloc'h. Ni on unan a hellfe divenn gwelloc'h or gwirioù oh en em glevet hag oh en em zikour. Oh en em harpa an eil egile hag oh en em zikour eo e tigasim aezamañchou en on touez.

Ne ouzon ket evelâto hag ar gwas droug, ne vefe ket e kalon peb hini, e kalon peb den yaouank dreist-oll. Deuet eo ar hiz d'en em glemm. Ne blij ket d'an dud mond a-benn d'an traou diaez. Ne garer ket riskla : a galon vad e lezer an dra-ze gand ar re all. Ha goulskoude, er boan hag er strivadennou evid tizoud d'or pal eo ema lezenn ar vuhez. An hini ne gompren ket an dra-ze a zo koz dija. Ha petra a zo tristoh da weled eged eun den yaouank a ugent vloaz hag a zo koz dija ?

(Prezegenn savet ha displeget e Bleun-Brug Lannilis gand **Annick Cabon** euz Kerskao e Lannilis bet d'ezi ar priz kenta e kenstrivadeg an displegêrêz.)

Bleun-Brug lanniliz

(Ton : petra 'zo nevez e Kêr-lz.)

Petra 'zo nevez, Lanniliz,
Ma 'z eo ken drant da yaouankiz
Ma klevan me ar binioù
Ar bedenn hag ar hantikoù ?

— Goueliou braz a zo ganeom,
Rag ar Bleun-Brug eo a lidom.
Koz ha yaouank, braz ha bihan,
Yez on tadou ganom amañ.

Enor ha gloar da bep hini
'n deus labouret heb damanti
'Vid ar Bleun-Brug, ha 'vid ar feiz
'Vid Lanniliz ha 'vid or Breiz.

L. Fave.

Kenstrivadeg ar skriva e Bleun-Brug Lanniliz

Va haz bihan.

I
Eur blijadur eo din displega deoc'h trez va c'haz bian, ag a zo unan ar brâoa etouez an anevaled.

Sellit mad oontan. E zaoulagad, glaz en deiz, zo alaouret en noz. E fri bian hag fin zo gaeat gant moustachou hir a bep tu de c'hinou. E deod bian ruz ne vez gullet nemet pa zigor e c'hinou da vlejal pe da lipad leaz.

Sellit c'hoaz ouz e ziousskouarn tano e giz seiz, ag a remu gant an disterra trouz. Aliez er galatrez e vezont soun var e ben pa glev ar logod o redet pe o trailla sier koz. Neuze e fich e lost hir, ag e zaou bao a zispac'h o ivinoù lem.

Pa za da kousket e klasc'h eul lec'h didrouz a goudor, a me a gar neuze passeal va dourn barz eun e vleou soupi ag, hir. Koumans a ra da rouchoni : ron, ron, ron... Va c'haz bian a zo kountant ag eüruz.

Gisele KERDRAON (skol ar Follgoad).

II

Ne anevézoc'h ket va c'hamalad bian ? Me zo o vont d'en diskuez deoc'h.

E gorf hir a zo guisket gant eur vantell seiz, gwen, marellet a zu.

E vemprou a zo berr. E ben round a zoug diou skouarn vihan beget, a glev an trouz a bep tu. E zaoulagad glaz a vel mad, memez hep lunedou ; an holl a lavar e vel sklear en noz evel en deiz.

Va c'hamalad a zo eur chasséour dispar. Evit paka e lod eo'h en em guz a dre d'ar sachajou guniz, hag et kousk ; mes... ne serr nemed eun lagad, ha pa base an « drottig » e lam varni, a zic'hoad anezi eun tamig gant e grabannou lemm ; a lesk anezi da reded eur pennad adarre ; hag e pag anesi a nevez.

Deoc'h e sonjas kaout kig fresk de lein, hag e lammas var eur « filip » ; eman, finoc'h eget ar chaseour a nijas var en bern fœn, da choarzi dezan.

Neuze e teuas da viaauli e kichen an diennerez o trel ; va mamm a roas dezan eur volennad leaz klouar.

Euz an noz pa zeskan va c'hentelliou e teu var va c'hein d'en em frotta ouzin. En em blijout a ra er goan e korn an tan, pe var va gouele ; hag en anv e kousk en eol.

Ar pris kenta a c'helfe da gaout e concours gymnastik. Pa za a c'hi var e lerc'h e c'hell en em zifen en eur bignat var ar voger pe var eur vezen huel.

Gouzout a rit breman piou eo va mignoun ?... « Mistigri » va chazic mad...

Denise BOUROULLEC (skol Gwinevez).

III

C'hoan o peuz e rachen deoc'h poltred va c'haz bian ? Ia gand bolontez vad... Daou miz eo, ag hen deuz dija eun tamig kiant vad. Kaer eo da velet gant e zaoulagad filamm, e fri roz kollet etouesk e vleou soupi.

Breman e man e kichen an tan, azezet var e ben adre ; roc'het a ra goustadig. Pa vel eun den diavez, ne ket aounig. Mont a ra d'en emm frotta diouz e zivesker, n'eur sevel e gein. Goudeze za eun dro e toul an aoled. Gant e zaoulagad kler, treuzet gant eur perlen aour, et taol eur zell interesset var ar podad souben a zo o virvi var korn an tan.

Neketa eo va c'hazig bian eur c'has a kiant vad. Evelse toud an ti a gar ar mou-moutig bian.

Marie-Louise LARSONNEUR (skol ar Follgoad).

Va hi bihan.

I
Va c'hi bian, melen a zo hanvet Bobby. Yaouank eo c'hoaz. Coumans a ra diouall, ar zaout en eur ober evel eus ar c'hi koz. Arzal a ra gant imor par vez distaget ar zaout. Ebars ar park e chom tost dezo mes da ziuall ho deuz m'o deus c'hoant da laërez eur gaolen pe eur c'hinaouad guiniz pe velchen, ar c'hi bian eveziant a lamma d'ho diousskouarn pe d'ho lost.

Fidel e vez atao da zero'hel anezo tost an eil d'eben ha pa vez deuet an eur d'ho dizrei d'ar gear en em gavet er porz e chom e kichen dor ar c'hraou da c'hedal an hini a zo bet kerc'hat ar zaout diganthan.

Pep hini en e bias va c'hi bian ; eürus d'en em zantout libër a deu d'en em frotta
ous divesker e vestr.

Hag eun tammig losteg e heuill anezhan beteg e lok, eleac'h ma chom pri-
sonnier eur pennad mad e doug an deiz. Eno adarré n'e tosta den dianvez e veza
buan declaret gant Baby fidel gardien.

Plijout a ra d'in c'hoaz, abalamour m'eo karantezus evit ar vugale m'o deveus
c'hoant da c'hoari gantan. Morse ne vez inouet o chachal pe o c'haloupat var lerc'h
en dra bennag.

Karet a ran va c'hi bihan hag ne rofen ket anezan d'a zen e bet.

Paulette PÉDEN (skol Plouider).

II

Anavésout a réhor va hi bihan ? Médor éo i ano. Oh ! pégen brao éo va hi. Du éo,
német bég i pattou arahoc so guen. E vusellou so lédan, é daoulagad zo bras, du a
skédus, e benn so guen, a ga liez, évézon guélet. Chentil éo, vit tud en ti, méz droug
vit en estrenn. Intelligent éo. Bemdez vez confiet d'héan a zaout da sioual, digoret
vez d'héan an hodé, hag en hent vit mont d'ar park. Médor sa kuit gant a saoud.
Ingavet é penn é béag, aséset kichen an hodé, sellet a ra euz ar saout. Médor va hi
bihen, so allies répoz kichen an or. Péséguir éo intelligent, pa vez hen trouz bégag,
buen sao é benn, e diskouarniou soun ganta, ag hé daoulagad a lamp.

Né gavor-ked éo, charmant va hi bihen ? Mé gar ' anézan. Va camarade brassa éo.

Michèle TORCHEN (skol an Folgoad).



KONKOURIOU

An Aotr. Dujardin, rener Bleun-Brug Leon, a skrive deom warlerh gouelioù
Lanniliz :

N'em-oa ket gellet kemeret va lod a breder o renka B.-B. Lanniliz. Dre hraz
Doue, deut oa din nerz awalh, evid heuill ar gouelioù en o hed. Eur vad dispar
o deus grêt d'am halon ; n'eo ket warhoaz ema da veza anteramant ar brezo-
neg.

N'em eus ket bet a geuz d'ar skuizder paket ganin o selaou, evid o barn, 17
kaner pe ganérez, 2 zispleger, 2 zisplégerez. Setu, dre vraz, petra dreist an traou
all a dennas va evez. N'o deus ket ar genstriverien gouezet atao choaj an danvez,
pe int-i ; pe an dud o deus o heñchet ; da skouer : choaj evid ar merhed
kanaouennou da veza kanet gand pôtre, pe ar hontrol — ar memez kanaouen-
nou a vez klevet re aliez — poent eo sevel re nevez — ha dibab kanaouennou
nebeud anavezet — ha bernia ar re a glever ken aez bremañ pa vez bep sul,
koulz lavared, e parrez pe barrez, eur « banvez ar re goz » — Kenstriverien a
zo divouez ; ne 'z éus buhez ebet en doare-kana lod — Unan, herveoun (Salaün
Christine) a vije da veza kenteliet war ar han, da vale war roudou Eliane Pro-
nost — unan all (Le Bars Marcel) a ye mad e heñcha war an displega. — O
klevet ar wazed e ouézer e tle beza ar brezoneg o yez pemdeziek ; n'ema ket
an « ton » breizeg gand ar merhed atao. — Piu a roio kuzulioù da Gervella
Joseph evid sevel kanaouennou, ar gwerzioù hag an ton ? Reolennou a zo.

Da lavared eo n'eo ket kenstriverien a ra diouer, nag an danvez-kenstriva ;
met Bleun-Brugerien desket eun tamm war ar han hag an displega, kuzulierien
ha kelennerien.

Kenstrivadegou ar Bleun-Brug

Bleun-Brug Leon e Lanniliz.

N'eo ket bet fall kenstrivadegou skol Bleun-Brug Kerne. Kalz eo bet gwelloh,
avad, kenstrivadegou skol Bleun-Brug Leon : wardro 500 a vugale a zo bet o kens-
triva.

A-bréd diouz ar mintin, kerkent hag 8 eur hanter, e oa eun toullad mad a vugale,
wardro skol Sant-Anton e Lanniliz, dalhet gand Frered La Salle.

En devez a-raog e oa bet ranket pourchas trizeg klas, evid rei lojeiz d'an oll
juriou, trizeg anezo, e peb juri tri pe bevar ezel, oll, koulz lavared, mistri ha mes-
trezed skol.

Diou skol ha tregont o devoa kaset bugale da Vleun-Brug Leon. **Skolioù merhed** :
Plougerne, Kerzent-Plabennec, Plabennec, Kleder, Guisseny, Lokournan-Leon, Lan-
niliz, Treglonou, Sant-Fregant, ar Grouanec, Lesneven, Plouvorn, Plougar, Trelez,
Kernilis, Gwinevez, ar Vourh-Wenn, Bodiliz, Loperhed, ar Folgoad, Plouvien, Dirinon,
Plouneour-Trez, Lannarvily.

Skolioù paotred : ar Grouanec, Kerzent-Plabennec, Guisseny, Lokournan-Leon,
Lanniliz, Treglonou, Sant-Fregant, Kerniliz, Milizac.

Setu amañ ar vugale a zo bet da genta e Lanniliz :

Lenn : Cécile Kerouanton, Plougar ; Yvonne Laot, ar Vourh-Wenn ; Christiane
Boule'h, Plougar ; Michel Pellen, Milizac ; Philippe Tricoire, Châteaubriant.

Skriva : Gisèle Kerdraon, ar Folgoad ; Denise Bouroullec, Gwinevez ; Paulette
Peron, Plouider ; Michèle Torchén, ar Folgoad ; Marie-Louise Larssonneur, ar Folgoad.

Displega : Claudine Direur, Plougerne ; Anna Lapous, Bodiliz ; Madeleine Ker-
marrec, Kerzent-Plabennec ; Jean-Yves Le Vezo, Treglonou ; Joseph Bleas, Gwis-
seny ; Robert Gulanvarc'h, Lanniliz.

Kana : Anna Pennarguear, Plougerne ; Yvonne Laot, ar Vourh-Wenn ; Marie-
Louise Uguen, Plouneour-Trez ; Jean-Fr. Gulanvarc'h, ar Grouanec ; François Bizien,
Sant-Renan ; Gilbert Gouez, Guisseny.

Tresa : Hermine Micheau, Trelez ; Annaig Kadour, Sant-Renan ; Claire Lé Brun,
Kastell-Paol ; Anna Le Brun, Kastell-Paol.

Bugale all o-deus bet kenstrivet a strolladou. Setu amañ penaoz int bet renket :
1) Ar Grouanec (paotred) ; 2) Plougerne (paotr) ; 3) Kerzent (merhed) ha
Kleder (m.) ; 4) Gwisseny (paotr) ; 5) Gwisseny (p. re vihan) ; 6) Sant-Renan
(m.) ; 7) Lanniliz (m.) ; 8) Plougerne (m.) ha Treglonou (m.) ; 9) Kerzent (p.) ;
Sant-Renan (m.) ; Lanniliz (p.) ; Sant-Fregant (m.) ; Lanniliz (m.).

Evid an dud vraz n'eo ket bet kenkoulz an traou. Setu amañ penaoz int bet rentet :

Kana (merhed) : 1) Christiane Salaun, Lannarvily ; 2) Leonie Herve, Kerniliz ;
Annette Corre, Lanniliz ; Madalen ha Tereza Tanguy, Lambezellec, o-deus kanet
assemble.

Kana (paotred) : 1) Robert Landure, Lanniliz ; 2) Jean Boucher, Lanniliz ; 3)
François Bescond, Lanniliz.

Prezegerez : 1) Annaig Cabon, Lanniliz ; 2) Annaig Le Roux, Lanniliz ; 3) Marcel
Le Bars, Milizac ; Eugène Tallec, Lanniliz.

Kenstrivadegou Bleun-Brug Lokronan.

Setu amañ prizioù kenta Bleun-Brug Kerne :

Lenn : Jean Bescond, Landudec ; Pierre Ferec, Lokronan ; Sylviane Le Berre,
Pouldergat ; Renée Cariou, Lokronan ; Anne-Marie Le Berre, Pouldergat.

Displega : Francis Le Ste, Kerfeunteun ; Jean-Pierre Huitric, Kerfeunteun ;
René Haseoet, Lokronan ; Sylviane Le Berre, Pouldergat ; Alberte Griffon, Pouldergat ;
Jeanne Bourbao, Plomodiern ; Angèle Seznec, Pouldergat.

Kana : André Helguen, Landudec ; André Castrec, Kerfeunteun ; Pierre Joncour,
Kerfeunteun ; Jean-R. Guerrot, Kerfeunteun ; Marie-Th. Le Bris, Plomodiern ;
Marie-Th. Le Gouil, Pouldergat ; Alberte Griffon, Pouldergat ; Odile Quéau ha
Michèle Le Berre, Lokronan.

Kana a strolladou (paotred, re vraz) : 1) Landudec ; 2) Lokronan. — (Re
grenn) : 1) Kerfeunteun ; 2) Lokronan ; 3) Landudec. — (Re vihan) : 1) Kerfeun-
teun ; 2) Lokronan. — Merhed (re vraz) : 1) Pont-e-Kroaz. — (Re grenn) : 1)
Lokronan ; 2) Plomodiern. — (Re vihan) : 1) Lokronan.

Tresa : Marcel Gloaguen, Lokronan ; René Gloaguen, Lokronan ; Jean-Paul
Cabon, Kerfeunteun ; Marie Sergent, Pont-e-Kroaz ; Cécile Conan, Plogonnec.

O-deus kenstrivet : skolioù paotred Lokronan, Kerfeunteun, Landudec ha Plo-
gonnec. — Skolioù merhed Lokronan, Plogonnec, Cast, Ploudiern, Pouldergat, Poul-
dreuzic ha Pont-e-Kroaz. En oll : 216.

O-deus kanet (hep kentriva) : Lazou-kana skolioù al Likes, Kemper ; Sant-Youen,
Kemper ha Sant-Loeiz, Kastellin. En oll : 280 paotr.

Tud vraz : konta : Cécile Beneat, Roudouallec ; Pierre Doare, Pluguffan. —
Kana : Andrée hag Odile Gouil, Pluguffan. — **Prezeg** : Pierre Doare, Pluguffan.

Prizioù.

Rannet ez eus bet, er bloaz-mañ, etre ar re a zo bet o kenstriva en on tri Bleun-Brug : Rostren, Lokronan ha Lanniliz : 824 levr brezoneg, dezo eun dalvoudegezh a ouspenn 250.000 lur. Biskoaz n'eus bet roet kement a brizioù. Ouspenn levrioù brezoneg, on-eus bet roet d'ar re genta : beb a verhodenn breizad d'ar merhed ha beb a foulard bigoudenn d'ar baotred.

Setu amañ al levrioù a zo bet roet, gant an niver anezho : 90 Fatima ; 90 Buhez skeudennet Sant Fransez ; 90 Mignon ar Vugale ; 50 Santez Elizabet ; 60 Kanom uhel ; 90 Mojennoù ar Mor ; 35 lexique-breton-franç. ha français-breton ; 30 Geotenn ar Werhez ; 30 Barzaz ar Mough ; 25 Istor Breiz ; 25 Hist. de Bretagne (Poisson) ; 25 Konchennoù ar Ster Aon ; 16 E Skeud Tour braz Sant-Jermen ; 10 Buhez an Ao. Perrot ; 20 Seiz pennad lenn ; 30 Komzom, lennom ha skrivom brezoneg ; 12 Le Breton par l'Image ; 10 Me a zesk brezoneg ; 5 Yez hon Tadou (diviet) ; 20 Mil-Pok ; 12 Diwar c'hoarzin ; 10 Bleunioù Sant Fransez ; 8 Buhez Hor Zalver ; 5 Buhez vraz Sant Fransez ; 20 Gand red an dour ; 6 Istor balafenn. Eun toullad mad a niverennoù euz ar gelaouenn Bleun-Brug, a zo bet roet war ar marhad.

Er zizun warlerh ar Bleun-Brug on-eus tremenet dre an oll skolioù o-deus bet kenstrivet evid kinnig or gourhemennou d'ar vistri ha d'ar vugale. Enrollet on-eus ar re genta ha tennet dezo o 'foltrejoù evid beza roet e « projection » er bloaz a zeu. N'on-eus kavet nemed laouenedigezh dre oll.

Ha bremañ, kenavo da vloaz ha da hortoz labourom stard da zeski gwelloc'h c'hoaz ar brezoneg.



NEVEZINTI

E penn kenta miz Gouere ez eus bet kinniget deom eur pikol leor nevez flamm, skeudennet ha skrivet brao. Eur blijadur da weled ! Eun dudi da houzaout.

DASSON UR GALON
gant Loeiz Herrieu.

Illustré par P. Guérin.

Edition bilingue : ordinaire, 600 francs,
de luxe, 1.000 francs.

Evid e gaoud, skriva da :

M. l'abbé Mériadec Henrio,
Institution Saint-Ivy,
Pontivy (Morbihan).

C.C.P. Nantes 1617-66.

Hed-ha-hed al leor-ze, 'vel ma lavar e-unan, ar Barz Labourer e-neus strewet bleun e galon, frouez e spered, kanet hag askanet e feiz kristen, nerz e ene, ar yez vrezoneg, enor e vuhez...

Gwerzennoù flour, gwerzennoù skañv, leun a gan, a varzoniez : ekleo eur galon dener, eun ene sklêr ha didroïdel ha tost d'e Zoue.

eur pennad brezoneg êz

TRAOU GWELET ER PORTUGAL

(Eil pennad)

Lakit ar vretonec diwar ar miz da lenn on pennadoù « brezoneg êz », ha skrivit deom ho soñjoù.

War ar miz.

Ar menez a holo eul lodenn vraz euz ar vro. Meinez ha kraz eo. Ha koulskoude, gwez-olivez o deil glaz-loued a zo o kreski e-barz ar menez selh-se. Sellit ouz treid ar gwez avad, hag e komprenoh diouztu peseurt labour tenn ha hir a zo bet greet d'o lakaad da greski eno. Sevel mogerioù mein da zerhel an douar, ha dégas an douar euz ar stankenn beteg lein ar menez, eo bet red ober. Hag ar re o-deus greet al labour n'o-deus ket kutuilhet kalz frouez war ar gwez-se, sur a-walh, ken difonn evel ma kreskont. N'eus forz. Bugale a oa war o lerh. Hag ar re-mañ a zastum olivez e-leiz, bremañ, ken eo deuet an eoul olivez da veza trede pinvidigez ar vro.

Peogwir ez on krog gant ar gwez, emañ o vond da gonta deoh diwar benn ar seurt gwez on-eus gwelet du-hont, ha ne greskont ket du-mañ, dre an abeg m'eo re yén ar goañv.

An eukaliptus a zo unan anezo. Eun dudi eo tremen e kichen eur hoad eukaliptus, gant ar c'hwez vad a zo ganto. Eun dudi ive selled ouz o hefiou eeün-kaer hag ouz o delioù hir a-ispilh ouz brankou ken hir all hag o koueza izel. Med, petra a welan ? Dibikouset mad eo va daoulagad ? Ar wezenn-eukaliptus yaouank-se, sellit, e-neus delioù arhanteg war he brankou izellâ, ha n'eo ket delioù glaz-gwer evel ar re a zo er beg ? Hag ar gwez bihan-mañ, liou an arhant gwenn warno, a zo eukaliptus ive, neuze ? Ya. E-giz-se emañ ar bed gant an eukaliptus. Ar re vihanig a zo gwenn ha rond o delioù, hag ar re vraz a zo glaz ha hir o re. An eukaliptus a jeñch deil én eur greski. Hag én deliouze emañ talvoudegezh seurt gwez. Eul louzou mad ouz ar paz a vez tennet anezo, evel a ouzoh, moarvad. E-mod-all, n'eo ket mad ar gwez kaer-ze nemed d'ober tan, peogwir emañ gwéet ar hoad én o hreiz, ha ne haller ket o faouta. Ne vern ket. Kalz koajou eukaliptus a zo er Portugal ablamour da louzou o delioù, ha va gwreg he-noa keuz o kuitaad o c'hwez vad.

Ar gwez-dero Spagn, pe mar kavit gwell, ar gwez-dero spoue (chênes lièges) a zo stank er vro ive. O deil n'int ket heñvel tamm ebet ouz re ar gwez-dero o kreski e Breiz. Bihannig int, ha liou glaz-ludu. — « Pe da vare e vez eostet ar stouvou spoue (bouchons de liège) ? » a houlennas, a-greiz peb kreiz, ouz on heñcher (guide), unan euz ar vedisined a oa ganeom. — « Ma », a respontas egile, ken distrauilh ha ken siriuiz ha tra, « ar re-ze a vez dastumet beb nao bloaz. Ya, kuid a 'farsal, ar gwez a vez dirusket (diskrohenet) beb nao bloaz. Ar rusk a vez tennet kuit euz an traoñ beteg ar skourrou (ar brankou) kentâ. Ar re-mañ ne vezont dirusket gwech ebet, avad, pe e-mod-all e varvont. War ar hef (le tronc) ar rusk a gresk en dro, hag a-benn nao bloaz e teu da veza mad adarre. Sellit ouz ar gwez-se, ruz-ruz o hef : diskrohenet int bet nevez zo. Ar re a zo duoh a zo bet dirusket abaoe pell zo, dija. ...Setu dres eur hamion braz o tond gant an hent ; karget-oll gant kignadurioù (follennou rusk) dero spoue, dezo eur metr bennag a hirder ha eun troadad a ledander. Emaint o vond da gas ar rusk spoue-ze d'an uzin. Rag, bremañ, ér Portugal, on-eus on uzinou d'ober ar stouvou. Araog, sellit, e werzem on spoue d'ar Zaozon (Anglais). hag e prenem goude ze on stouvou spoue diganto. Nemed e tastument arhant diwar on houst. Setu ma on-eus savet uzinou evid ober on bouchonou on-unan. ag abaoe, ar spoue a zo deuet da veza kentâ pinvidigez ar vro. » — « Kalz tammou spoue a vez kollet, koulskoude, pa vez trohet ar stouvou ? » —

« N'eus koll ebed. An tammou bihan a vez gwasket ha peget an eil ouz egile d'ober traou a beb seurt : pladennou e-giz an « isorel » ha me oar-me ! »

Evid eehui gand gwez ar broiou tomm o kreski e-barz ar Portugal, komzom euz ar *gwez-orañjez*. Stank int ive. D'ar mare m'edom ér vro, e fin miz Mae, e oa dare (aho) ar frouez melen-ruz. Teo ha livet-kaer e oant, ken na fellas deom kaoud an tañva anezo. Siwaz ! teo-teo e oa o brohen ha ne oa ket kalz dour e-barz ! Ma oant kaer da weled, ne oant ket dreist da zebri. Re zeh eo an douar e-leh ma kreskont, evid doare.

Evid gwir, daoust d'ar vro beza glaz e-kichen Bro-Spagn, seh mad eo e kichen Breiz. Pa ho-peus c'hoant da en-em-glemm euz ar glao, du-mañ, ne ouzoh ket pegen braz eo ar binvidigez a deu d'e heul. Kit da weled broiou kraz ar hreisteiz, hag e komprenoh pegement a voued a vez degaset deoh beb bloaz, gand ar glao.

Ar *beizanted* a zo paourroh egéd amañ, eta. War droad e teu ar merhed d'an overenn heb sul, ha neket war velo-moteur ! Lod euz ar baotred, evelato, a deu war vélo. Med ar merhed a ya war droad, evel ma rée on mammou-koz.

War ar pemdez e vez kavet bandennadou peizanted, gwazed ha maouzed, o vond d'ar parkeier da labourad, war droad beb tro. N'int ket trist avad. Mond a ra an teodou en dro, bezit sur ! Hag an treid ive. Gwall Tonnuz e kerzont, kén boazet da vale evel ma 'z int.



Merhed ar Ribatejo (Bord ar stêr Tejo pe « Tage » én Galleg) o tougen boutegadou traou ganto war o 'fenn. Edont o vond da ganna dilhad, hervez ar pezh a lavarent deom. Remerkit ar goulourdrann (gourde) a zo gand an hini dostâ. Gand re seurt-se, ive, e vez kaset gwin d'ar parkeier, du-mañ e-barz ar Vendée.

Oh erruoud er Portugal, e kreiztez ar vro, war dro serr-noz, e oam bet souezet-braz, alvaonet, va gwreg ha me, o weled ar *peizanted* o tond endro d'ar gêr, tokou du ledan war o 'fenn, ha seurt pillhou du o koueza euz dindan o zokou war o choug... d'en-em-vired ouz an heol-griziaz, moarvad. N'eus forz, gand o dilhad du, euz kern o 'fennou betek beg o zreid, hag o zokou iskiz, seurt merhed a dle beza dispar da sponta al laboused, pa labouront en o 'farkou ! Med, goude ze, n'on-eus ket kavet merhed gwisket ken divalo kén (ken vil kén).

En deiz war lerh, o kregi da vond war du an hanternoz, on-eus komañset gweled maouezed o tougen o zraou war o 'fenn. Ha me ha tenna fotoiou, ha sevel eur film... N'eo ket bet hir a-walh ar film-ze da dapoud anezo toud, na tost ! Ar merhed diwar ar mêz, sellit, a zoug peb tra war o 'fenn, dreist-oll e hanternoz ar vro. Lien ha dilhad, binviou, bara, gwin, boued an dud, boued ar zaoud, kement tra zo, a vez lakeet ganto e-barz ar bouteg a zougont war o 'fenn. Eur yar am-eus gwelet, zoken, o tihouzouga ken dispont ha tra, e-barz bouteg eur vaouez koz, a-uz d'he 'fenn. Eun dudi eo selled ouz ar merhed-se, o tostaad pe o pellaad, en eur vraniskellad ken brao all o horv, dindan o zamm.

Ya, kaer int da weled o vond ken distag. Ha koulskoude n'int ket gwisket euz ar re vreañ. Eur skerb zu (écharpe noire) a vez o kuzad o 'fennad bleo, al lost anezi o koueza war o choug ; eur vroz hag eun tavañcher a vez en dro dezo, hag eur re loerou gloan du a ziskenn euz dindan o broz beteg a-uz d'o zreid... Ne gomprenit ket mad ? Iskiz eo ive. Loereier ar merhed n'o-deus troad ebed, evel ma vije trohet an treid kuit diouto. E-giz-se, n'eus ket toullou da wriad, na petra 'ta ! Toullet buan e vefe o loereier ganto ive, peogwir e valeont atao (dahlmad) diarhen-kaer. Ablamour d'an amzer domm, sur-mad, med ive evid espern ar boteier, marteze... N'eus forz. Sellom outo eur wech c'hoaz, o vond ken distag ha ken sonn all dindan o zamm. Ne gav ket deoh 'e tlefe on dimezelled hag on intronezed ober kement all, evid stumma o horv ? Yahusoh e vefe evita egéd poania o vale war vegig o zreid, e-barz o boteier taloniou uhel. E gwirionez, n'eus netra gwelloc'h evid eeuna livenn-gein ar hrennarded techet da gromma o hein, egéd lakaad anezo da vale gand traou pounner war o 'fenn, en eur vond diarhen-kaer war veg o zreid. Marteze a-walh, a zañjoh-c'hwi, med ne welan ket « dimezelled » hag « intronezed » o vond e-giz-se da bourmen e kêr. Ma ! ar Portugalézed na zougont ket nemed boutegadou traou, picheradour, fagodennoù koad (hordennoù keuneud), plankennoù ha kement tra bounner zo. An traou skañv a vez lakeet memez mod ganto war o 'fenn. Homañ a zo o vond gand he skerb pleget ken brao all, hag honnez gand he bokidi, war he 'fennad bleo. Trawalh eo evid lakaad anezi da vale eun-kaer, avad.

Ar *baotred*, int-i a zoug o zraou war o choug, evel du-mañ. Heñvel int da weled ouz peizanted on broiou, nemed e vez eur boned hir gloan du ganto e-leh eun tok, peurlïesa. Ar re a zo war ar skeudenn a welit amañ, n'o-deus ket ar seurt boned giz koz. Sellit ouz o hirri, avad. Kirri hanter-noz ar vro eo ar re-ze. Gand o rojou bihan heb skinou, e tégasont soñj d'an dén euz kirri Huned Attila, evel ar re a oa war on « Histoire de France », ne gav ket deoh ? Na spontit ket dirazo. Ar re-mañ n'int ket tud gouez ha kriz. Kristenien int, evel c'hwi ha me. Sellit pebez iliz kaer a zo bet savet ganto, pe gentoh gand o zud-koz. Iliz *Povoa de Varzim* an hini eo.



Povoa de Varzim : Kirri ar vro.

War an aot (war bord ar mor).

Povoa de Varzim a zo eur porz-mor. *Pesketaerien* a zo o chom eno, eta. Ha tud a feiz eo ar re-mañ ivé, moarvad. Rag, war o bagou kostezet war an trêz (sable), ne welan nemed anioù relijiel, koulz lavared. Sellom pishou ouz anioù

ar bagou-ze livet splann én ruz, én glaz pe én gwer, hag o lugerni (o lufra) kën brao, dindan an heol tomm-grizias. Seiz bag ha daou-ugent a zo amañ. Setu me o verka o anoiou war garned beaj va gwreg. N'emaon ket o vond da lenn deoh ar 47 ano-ze, gand aon d'ho fêza. Med, setu amañ ar re am-eus dibabet evidoh : 8 hebkén a zo anoiou direlijiel, evel *Rosalina, Pepita, Venturosa, Inven-civel* (didreh), etc. An 39 bag all a zoug anoiou o selled ouz an Aotrou Doue, On Salver Jezus-Krist, ar Werhez Vari, pe ar Zent : *Fe en Deus* (Feiz én Ao. Doue), *Divina Providencia, Paraíso* (Baradoz), etc. — *Jesus Nazareno, Viva Cristo-Rei, Coração de Jesus* (Kalon Jezus), etc. — *Senhora da Boa Morte* (Intron Varia ar Maro Mad), *Senhora das Dores* (I. V. ar Seiz Glahar), *Nossa Senhora da Paz* (I. V. ar Peoh), *Mês de Maria* (Miz Mari), *Nossa Senhora de Lourdes*, hag evel just, *Nossa Senhora de Fatima*, etc. — *Sao Antonio, Sao Judas Tadeu, Sao João Brito, Santa Apolonia*, etc.

Hag en eur skriva an anoiou-ze, e soñjen penaoz e hall eun dra zister, evel choaz eun ano, rei da anaoud d'an oll ar saññimañchou a zo kuzet e-barz ar galon. Soñjit mad é kement-se, Bretoned. Anoiou ho pagou (ma 'z oh peske-taerien), anoiou ho pugale, hag ivè anoiou ho loened, ho tier ha kement zo, an oll anoiou-ze a zo eun testen (témoignage) evid an douristed hag an dud a beb seurt o vond da Vreiz. Trawalh eo da ziskouez dezo, pe ez oh tud a feiz pe n'oh ket, pe e fell deoh mired ar brezoneg e Breiz pe lezel anezañ da vond da goll...

(Da genderhel.)

D^r J. Tricoire.

TENZOR AR BREZONEG BEO

Eur vammenn all a vrezoneg beo eo al levriou a zo bet embannet. Levriou koz a zo hag a gavom enno gériou pobleg, war nez beza ankounac'heet en on amzer, p'emaom o klask ijina gériou nevez da lakaad en o 'flas. Lennet am eus evel-se « *An Ene Kristen e bali an neñv* ». Skrivet gand an ao. Rivoal, person Skaer. An aotre da voulla a zo euz an 17 a viz Meurzh 1872, ar skwerenn a zo em herzh a zo euz ar c'hwehved moulladur. Re nebeud a ano a glever euz al levrig-se ha koulskoude n'eo ket stank al levriou a vefe enno brezoneg ken flour ha ken dibikouzh. Tennet am eus anezañ eun nebeud mad a hériou. Levriou nevesoh a zo ive hag a vefe tro da bennaoui enno ha da zastum eun eost puilh evel levriou Jakez Riou, Youenn Drezen, Yeun ar Gow, Yvon Crocq, Loeiz ar Floc'h (euz Bodiliz), Jakez Kerrien, an Ao. Helies, Lan Izizan, Y.-V. Perrot, Toussaint ar Garrec, Dir-na-dor, Jarl Priel, Job ar Bayon, Guillaume, L. Herrieu ha ped all evel-se !

Echuet am eus pennaoui e levr Yeun ar Gow : « *E skeud Tour braz Sant Jermen* ». Piou a grogo gand levr pe levr all ?

21. Aouli.

Setu eun notenn hag a zo bet digaset deom gand an D^r J. Tricoire.

E niverenn Meur-Ebrel *Feiz ha Breiz*, 1941, e lenner « aouli ». Med en niv. Mae-Mezeven, p. 54, ez eo bet difaziet gand an Ao. Perrot : « *aouli* e-neus kollet e lizerenn ziweza ar voulèrèz hag a dle beza lennet *aoulin* ».

Neuze eo sklêr an traou, a gav din. *Aoulin* = *Aour-lin*. Bezin dour dous eo ar plant-se, greet oll gand neud hir ha moan, evel ar stoup, evel al « lin ». Glaz eo ar plant, ha koulskoude, pa vez o kreski, e teu da hweñvi, c'hwezet oll gand klogorennou « gaz carbonique ». Ha neuze, al lodenn a zav war horre an dour a zo nielen-kaer, o lugerni dindan an heol tomm evel an « aour ». Ar gér « aour-lin » a zo justoh eged ar re all (glanndour = gloan-dour ; gloaneg) d'am meno. Sellet piz outo, en hañv-mañ, war horre ar poullou-dour, hag e vloh a-du ganin, moarvad.

30. Alvaoni.

« Ne jomas ket pell da *alvaoni*. » (E skeud, p. 35.)

54. Ampustuilh.

= impotent. « Tud klañv hag *ampustuilh* a welis (e Lourd). » (E skeud, p. 132.) Kenveria gand *Ambuzuilh*, n. 31.

55. Anduitilh.

Gweled « *a-skrab* » niv. 43. « O stlapa gwenneien *en anduitilh* da voused ar vorh. » (E skeud, p. 111.)

56. Aplikant.

= orin, oristal. « Etouesk on devezourien e oa *neur a aplikant*. » (E skeud, p. 69.)

57. Asinet.

« Kerkent hag *asinet* an eured. » (E skeud, p. 208), deiziet, divizet ha merket an deiz. Moarvad ar gér galleg « *assigner* ».

58. Atapi.

= « manie » e galleg. « Yann e-noa an atapi da vond da houlenn merhed. » (E skeud, p. 82.)

59. Avanturi.

= riskla. « An den *ne avantur nclra* »
« Na koll na gonid ne ra. »
(E skeud, p. 167.)

60. Anken, enk, ankou.

[F. F. *Anken* hag *enk* o-deus ar memez gwrizienn, an hini a gaver ive er gériou latin ma teu anezo ar gériou galleg « angoisse » hag « anxiété », hag ar gregach *agkhô*, gwaska, moug. E kembraeg *yngh* ha *cyf-yngh* a dalv ar brezoneg *enk* ; med *angen* eo « ar pezh a zo red », « la nécessité » ; *angau* « ar maro » a dalv ive ar brezoneg *ankou*.

O sonjal e ster ar hembraeg *angen*. An iwerzoneg *ecen* « nécessité », e hellfed staga ive *ankou* ouz gwrizienn *anken* hag *enk*.

61. Azez.

« *ober eun azez* », azeza eur pennad (Leon). « *Deus 'ta, en ti, da ober eun azez, eun azezig*. » E Kerne ive « Daoust da ze e lakeas eun azez war eur mên ». (E Skeud Tour Vraz, Yeun ar Gow, p. 19.)

62. Azvi.

= gwenvi e Plouarzel (Mab-Arzel, 1942).

Azvi, a skriv Vallée (F. ha B., 1942) eo ar gér gwella evid « mûrir » — « mûr » = azo, azvet, kembraeg : *adfed*, distaget *azvet*.

[F.F. Ar gér a deufe euz az (gwelit latin *ad*) + med (—i) = prest da veza medet (Geriadur Skol-veur Bro-Gembre). Ar gér brezoneg koz *admet*, distaget azvet moarvad, a dle beza bet distroadet gand *azv*, *azo*, *ao*. Kerkent ha m'eo bet ankounaheet edo ennañ ar gér *med* (—i) : war skouer *darev*, *darev-et*, eo bet tennet *azo* pe *azv* euz *azvet* ; ha goude eo bet distroadet *azvedi* gand *azvi*.

Ar gwiniz du a vez trohet eun tammig glaz heb beza azvet ha lezet da azvi araog o dorna. An avalou a vez kutuilhet darev, ha lezet da azvi araog o dibri.]

1. Badinad.

Diwar ar gér galleg « badiner », farsal, komz diwar fent. « *O vadinad emaoût kement-se ? N'eo ket gwir ?* » — « Arabad eo dit kredi kement a lavar, n'eo nemed eur badiner, n'eus nemed badinèrèz gantañ.

Divadin = heb farsèrèz, e gwirionez : « Ya, moarvad ! divadin ? — *Divadin ayad !* » (Gorre, Leon.)

2. Bale.

« Kaset am eus anezañ *da vale* » (da bourmen, da suta...) — « *Kerz da vale* ! » (F. le camp !)

« *Moh war vale* », moh krenn. « War ar moh bihan eo bet fall ; *ar moh war vale* avad a yec gwelloh. » (Merhed diskennet e Pont-Keo, distro euz foar Gorantin vraz e Kemper, Kerzu 1941. — E Landudeg e vez lavaret « *moh-rouz* ».)

3. Bahad !

A lavarer e Goueled Leon pa vezer o vond da ober eun dra bennag : « *Bahad d'an dorz, bahad d'al labour* ! » (Mab-Arzel 1942.)

E kalz tehiou all a vez lavaret : *beh*.

[F. F. Bahad a zo evid *bazad* = taol baz, da lavared eo : « Skoom warni ! » Gwelit ive bahadou evid bazadou.]

4. Bajenn.

« *Bajenn dit* ! » tizet, tapet out bet, er c'hoari-tapoud (Kerlann, Tregon, 1941).

5. Baraenn.

= eur voul pe eun dorz vara. Moarvad e Skaer eo bet dizonjet ster ar gér hag e vez lavaret : eur *varaenn-vara*, distaget eur *varren-var*.

Evid ar gér kolo eo digouezet ar memez tra. E Leon eur *goloeg* a zo eur lern kolo (pe blouz). E Skaer e vez lavaret : eur *goulég-plouz*, eur *goulég-foenn* ar gér koloeg e-neus kemeret ster ar gér « hern » koulskoude e vez lavaret eur *gouleenn* (eur goloenn) evid eur gestenn blouz (da lakaad gwenan). Ar gér kolo a zo chomet en daou her-ze.

Souezus eo gweled penaoz n'eo ket bet dizonjet a-grenn ar gêriou hanter eet da goll e karier pe garter. E gorre-Leon ne vez ket lavaret eur « harrad plouz » med chomet eo ar gér *plouz* e « *ti-plouz* », « *toer-plouz* » — « *tenna plouz berr* ».

6. Bara-kan.

= bara heb goell ar zervij da overenna. Deuet euz ar galleg koz. *Litré* a lavar « *pain à chanter* ».

Gellet e vefe studia evel-se eur guchenn vad a hériou deuet euz ar galleg koz ha chomet beo e brezoneg : Gwelet on-eus « *a-vole-vann* » (à la venvole). Kalz re all a vefe kavet : *poefichenn* (courte-pointe), *Gorre-Doue* (le lever-Dieu, Balzac), *Otou* ha *bazou* e bro ar Hap : hauts de chausses, bas de chausses, *perrukenner*, *apotiker*, *kazetenn*, *bikorbin* (bec de corbin), *jedi*, etc., etc...

7. Batouilhad.

= glabousad, fistilha. « Troet awechou *da vatouilhad*. » (E skeud, p. 71.) — « O selaou *ma batouilh*. » (E skeud, p. 55.)

8. Baz-roued.

= haveneau. « Pa veze tre hag izel ar mor e yeem gand *ar vaz-roued* da besketa cheored. » (E skeud, p. 172.)

9. Baz.

« *Lakaad ar baz war an oh* » (mettre le bât à un cochon = allier deux choses disparates et qui ne doivent pas aller ensemble.) « Naig a zo fichet, dilhad nevez a zo ganti, med gand he botou-koad da bemdez ema-hi : *lakeet he-neus ar baz war an hoh*. » (S. Vig, Peron, 1942.)

10. Beel.

Beelou, diou veel = skudellou koad da horo ar zaout, da gempenn an amann ha da ober kant ha kant tra all. « Bremañ ne gaver ket *a veelou ken* ; eur *belead dour*. » (Skrignag, Perrot, 1941.)

V. F.

keleier

Kestou evid ar brezoneg :

Bleun-Brug Lokronan	20.000 lur
Bleun-Brug Rostren	20.000 lur
Bleun-Brug Lanniliz	46.000 lur
En oll.....	86.000 lur

Goueliou Kerne	204.000 lur
Goueliou Brest	108.000 lur
Goueliou Montroulez	60.000 lur

Goueliou Kerne ha Brest.

Eun toullad mad a houeliou breizeg a zo bet adarre, e Breiz, en hañv-mañ. Ne zeblant ket an dud beza skuiz, tamm ebed, gand seurt goueliou ; er hontrol eo. Goueliou Kerne ha Brest, kaeroh egad biskoaz, n'o-deus bet morse kemend a dud. Peadra a zo aze da lakaad lorth er Vretoned. Or yez ne vez ket ankounac'heet. Eur gêrig berr ha touchant a laka arhant braz da goueza, bep tro, e kef an F.C.B. Guspenn, e Brest e oa eur stal levriou brezoneg hag a yec mad en-dro.

Brud.

Gand joa on-eus digemeret niverenn genta *Brud*, ar gelaouenn lennegel, gortozet abaoe pell-zo : 128 pajennad brezoneg yah, dindan eur golo kaer ; al lodenn vrasa euz ar gelaouenn a zo diwar bluenn Per Hellas. Kavoud a reer ive, pennadoù all gand Per Trepos, Reunan ar Moug, P.-M. Mevel, Yeun ar Gow, Charlez ar Gall, L. Lok, A. ar Berr, G. Bernier, F. Inizan, D. Tricoire, Tangi-Prigent, ha liziri gand tud yaouank euz ar skoliou.

Diazezet eo ar gelaouenn-mañ war Emgleo-Breiz. « Savet eo *Brud* evid mad ar brezoneg, evid *bruda* ar brezoneg. » E bal eo lakaad da zihuna gwir skrivagnerien e-touez ar Vretoned a zo c'hoaz ar brezoneg evito eur yez veo leun a spered hag a zaour.

« *Brud* a fell dezi beza eur gelaouenn a unvaniez gwirion. » Digor e vo eta d'an oll Vretoned.

« *Brud* ne fell ket dezi sevel tabud diwar-benn tra na dén. » Servicha ar brezoneg ha netra ken.

Lavared a ra c'hoaz : « Ne deuo ket *Brud* da veza eun dachenn a emgann etre Breiz. Ne gollim ket or buhez nag or mól o respont d'an dismegañs, d'ar flemm, d'ar broud, d'an tamall a-berz prezegerien pe tud dallet ha bouzar ».

Setu komzou fur. Ra gouezo had mad en ero nevez, ha ra zavo warnañ cost puilh.

Brud : kelaouenn lennegel drimizieg Emgleo Breiz. Koumanant bloaz : 900 lur. Skoazell : 1.500 lur. An niverenn 250 lur. B. P. 17 Brest. C.C.P. 1921.04 Rennes.

Diskouezadeg ar brezoneg.

Abaoe penn kenta an hañv e heller gwelled, e mirdi Kemper, eun diskouezadeg kaer war ar brezoneg. Talvezoud a ra mond d'he gweled. Milieroù a dud o-deus dija tremenet drezi. Kalzig a levriou brezoneg a vez gwerzet ; levriou da zeski ar brezoneg, dreist-oll. En diskouezadeg-se, ar Bleun-Brug e-neus eur plas kaer.

E koun an D^r Libéral.

D'ar sul 18 a viz Eost, eo bet benniget e Sant-Vig, mênbez an D^r Libéral. En dro d'e wreg, d'e vugale, d'e vamm ha d'e vreur-kaer, an Tad Chardronnet, ez oa en em vodet eun nebeud mignoned da bedi evitañ, da ziskouez ne zisoñjent ket ar mignon ken tomm e galon ha ken hegarad e vouse'hoarz, ne zisoñjent ket ar Breizad kaloneg e-nevoa kredet, 9 bloaz 'zo, d'ar mare ma oa c'hoaz ken trubuilhet ar sperejou, kregi e banniel ar Bleun-Brug, ha kas anezañ war-raog, e-kreiz diêsterioù ma 'z om re dechet da ankounac'haad. Fallaet e yehed gand re a labour, Yann-Hervé Libéral e-neus kendalhet da veza evidom eur skouer a gristen hag eur skouer a vreizad greduz hag eeun.

Priz Iennegel Emgleo Breiz (F.C.B.).

On lennerien o vo laouen o houzoud ez eo bet roet priz Iennegel Emgleo-Breiz — anvet er bloaz-mañ priz Jakez Riou — d'an Ao. Beleg Gabriel Eliès, anavezet mad ganto dindan e ano-pluenn *Mab an Dig*.

E Brest o tregerni gand safar ar biniou, e-pad ar banvez kinniget gand kêr-Vrest da renerien ar hevennou breizad hag ar bagadou sonerien deuet euz a beb bro en Europ, an Dr Dujard'in, prezidant Emgleo-Breiz, a roas da anaoud ano ar skrivagner loreet gand ar jury. Ar varnerien o-doa da zibab etre meur a oberenn dalvouduz : gand hini G. Eliès « Kizier-noz Sant-Pabu » eo eet ar maout.

An Ao. Eliès e-deus embannet dija eun toulladig leoriou galleg diwar-benn Breiz, hag e vro henidig dreist-oll, aot an aberiou. Rener-skol eo bet ive e Sant-Pabu. Ema bremañ en Afrik, aluzenner en on « Armée de l'Air ». Ar bloaveziou kaled e-neus tremenet en Alamagn evel prizoniad hag ar bloaveziou brezel e-neus bevet en Afrik abaoe, e deus advenet barzonegou eeun, tener ha fromuz, a zeulo er-mêz dizale en eul leor anvet « Bleuniou Arvor », barzonegou a zo evel kement all a vokedou diwanet e kalon an harluad, oh hiraezi d'e vro evel d'eur baradoz kollet.

Ra gavo amañ Mab an Dig gourhemennou an oll re a zo bet plijet gand « Saout Lambaol ». Ha ra vo mouliet abred « Kizier-Noz Sant-Pabu » !



P	I	N	V	I	D	I	G
A		I	O			N	I
P	A	L	U	D		T	
E	N		L	A	E	R	
R	O	I	O		L	O	A
O		L	U	R		N	I
U		I	Z		R		O
	Z		V	I	O	U	

GERIOU - KROAZ

Diskoulm da gudenn an niverenn 102

A-led.

- I. Kemend den a zo en dro deom.
- II. Pa vez droug ar mor e vez kalz anezi.
- III. Traou mad pa vez yen an amzer.
- IV. Mad d'ar zaout hag er zoubenn.
- V. E nebleh. - Diou wech ar memez vogalenn.
- VI. Dafivadig. - Pa vez goullou ar zah n'eo ket gwir.
- VII. A lavar eur plah. - Meur a hini a zo e kêr.
- VIII. Evidout a vez implijet. - N'eo ket amañ.

A-bik.

1. Bet roue e Breiz.
2. Beza souezet.
3. Ma 'z out eur hloh e hellez henn ober. - Tost.
4. Ne vez ket roet evid peb tra.
5. Konta.
6. Galloud.
7. E Landerne. - Eur zakramant.
8. Fin pebhini. - Eur mestr braz (direnket).

	1	2	3	4	5	6	7	8
I								
II								
III								
IV								
V								
VI								
VII								
VIII								

Embannadurioù "EMGLEO BREIZ"

« FONDATION CULTURELLE BRETONNE »
Boîte Postale 17, Brest, C.C.P. 380-96 Rennes

Lexique Breton-Français et Français-Breton
(Stephan-Seite), 330 francs, franco.

L'Orthographe Universitaire de la Langue Bretonne
(Falc'hun-Dujardin), 180 francs, franco.

Komzom, Lennom, ha skrivom Brezoneg
(J. Tricoire), 280 francs, franco.

Mil Pok (Pezig-c'hoari en eun arvest, gand J. Noel),
50 francs, franco.

Seiz Pennad-Lenn, 50 francs, franco.

Mojennou ar Mor (Pierre Hélias).
Edition Jos Le Doaré, 280 francs, franco.

Geotenn ar Werhez (Jakez Riou), 380 francs, franco.

Barzonegou (Reunan ar Moug), 195 francs, franco.

Gand Red an Dour (Roparz Broudig), 195 francs, franco.

Dasson ur Galon (Loeiz Herrieu).
evid Skoliou Bro-Wened, 330 francs, franco.

An Azennig bihan (evid ar vugale), 180 francs, franco.

Ar Roh Toull (Jakez Kerrien), 330 francs, franco.

Textes de Thèmes (Pierre Trépos).

Bleuniou Arvor (Mab an Dig).

DINDAN AR WASK

Eur Honiklig Boudedeo. (Evid ar vugale.)

Deskom Brezoneg (Seite-Stephan).

Bilzig (Franch al Lay).

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — G.P.P.P. N° 21697



Kousk va Lellig

Son ha ton gant L.Lok

Kousk, kousk va lel-lig, kousk din-dan la-gad ar ste-red e-chu kan al la-
 bou-sed, Ha kloz bleu-niou ar bo- ked. Kousk, kousk, va lel-lig, kousk, Evid echui
 E-man pep trouz o re-vel ne-med ar sti-vell. douz-der va fo. kou

1. Kousk, kousk, va lellig, kousk,
 Dindan lagad ar stered;
 Echu kan al laboused
 Ha kloz bleuniou ar boked.
 Kousk, kousk, va lellig, kousk...
 Ema peb trouz o tevel,
 Nemed ar stivel.
2. Kousk, kousk, bihanig, kousk,
 Na pegen sioul ar mêziou !
 Prennet doriou an neiziou,
 Skuiz zoken da c'hoariou.
 Kousk, kousk, bihanig, kousk,
 Kousk e peoh, kaer da huñvre,
 Beteg ar beure.
3. Kousk, kousk, êlig-me, kousk,
 Didrouz da vamm az tiwall,
 He harantez o hedal
 D'az lakâd c'hoaz da dridal
 Kousk, kousk, êlig-me, kousk,
 Pa dañvi, gand c'hoarzigou,
 Douzder va fokou.

L. Lok.

Ar ganaouenn-mañ a zo bet moullet gwechall war
Kroaz Breiz. Rebechet oa bet da L. Lok da veza roet
 dezil eun ton kemraeg. An ton en dro-mañ a zo
 unan nevez.

Kanet eo bet al luskellêrez gand Eliane Pronost
 e Bleun-Brug Lannilis ha plijet eo bet. War goulenn
 selaouerien eh embannom ar ganaouenn.